

MIGNOUN

AR VRETOUNET,

PE

DISPUT AMUSANT.

COMPOSET

Étant enl. Leonard,

**Evit quelennadurez an dud divar
ar meas.**

Quid vetat ridendo dicere verum ?

*Petra ziven en eur vadinat lavaret
ar vriones ?*

E BREST,
E TY V^e J.-B. LEFOURNIER
Imp.-Librer, Ru Vras, 86.

1841.

Approbation ar Viquel Vras.

J'ai lu, par ordre de Monseigneur l'Evêque de Quimper, le manuscrit intitulé : *Disput amusant pe Mignoun ar Vretounet*. Je crois que la publication des réflexions courtes et simples de l'auteur, peut être utile au peuple des campagnes.

Quimper, le 31 Mars 1841.

Signé : **KERAUDY**,
Vic.-Gén.

LENNIT.

Ma na velomp mui, evel epad ar revolution ar c'hroaziou discaret, an ilizou profanet, an auteriou distruget, imachou ar zent bruzunet ha ministret Jesus-Christ persecutet, arabat eo sounjal o defe an dud impi renoncet da ober ar brezel d'ar religion gatholic. N'ho deus great nemet chench armou : anavezet ho deus dre experianç, penaos ar persecutionou pell dious mouga ar feis è caloun ar gristenien ne reont, evel è commançamant an Ilis, nemet ên allumi ac êr c'hresqui. Decrial, drouc-prezec ha goapaat ar religion ac ar velêyen, chetu enò ar voyen a implijont hirio evit dont à ben eus ho dessinou milliguet. Composi a reont à bep seurt levriou fall pere a scuïllont ac a adont drè ar vro ; beza ez eus è Breis-izel tud fallacr aoualc'h evit trei è brezounec al levriou-ze pere a apparis beza levriou devot, mès pere a zo leun à vaximou faos ac heretic. Bezit var evez, va c'henvrois, an armou-ze ma na d'int quet quer spountus ac ar supplicou ho deus anduret ar verzerien ha darn eus hon tudou cos, n'int quet nebeutoc'h dangerous. Beza ez eus cals tud eus à bere ar feis a zo sempl ac an devotion laosq, pere o clevet aliès drouc-prezec ar religion ac è ministret,

a deu nebeut à nebeut da zilèzel ar sacramanchou ha da zisprijout compsou ac avizou ho fastoret. Diouallit ous an divroidi a red drè ar vro evit guerza ha distribui mêmès evit netra, heuriaou pere n'int quet approuvet, ha pere n'int composet nemet evit ober dar vretounet, dan dud diyar ar meas, renonç d'ho religion ha coll an istim a dléont d'ho belêyen. Destumet em eus el levric-ma, hanvet *Mignoun ar Vretounet*, quement a glevit da lavaret enep ar religion ac enep ar velêyen. Mar en lennit à barfetet e velot pe guer faos ha peguen troumplus eo compsou an dud impi. Caout a reot ive e *Mignoun ar Vretounet* ar voyen da dremen, èn eur fêçoun agreabl ha profitabl, meur à bennat amzer pere a dremenit aliès oc'h offanci Doue, evel o vont da veilla pell dious ar gueur, pe o vont dan dançou da sul d'abardaez, pe o lavaret compsou vil ha dishonest.

Tadou à famill, lennit pe laquit lenn *Mignoun ar Vretounet* è presanç tud ho ty pa vezit dibreder, evel èr goân goude coan pa choumit da gaozeal e tal an tân; preservi a reot èr c'his-se ho pugale ac ho serviceurien dious cals à bec'hejou.

*Pliget gant Doue ac ar Verc'hes glorius Vari
rei ho benediction d'am labour.*



MIGNOUN

AR

VRETOUNET.

Eur sulvez d'abardaez, en eur barres ne hanvign quet, eur vanden baïsantet eus ar mêmès amezeguez a yoa en-em zistumet evit marvaillat ha passeal an amzer. Endra edont guir vella o caozeal, e c'herruas eun ozac'h pehini a hanvign Fanch.

Fanch. Ne oufach quet, potret, kelou mad em eus da annonç deoc'h ?

Yan. Pe seurt kelou, Fanch ?

Fanch. An Aoutrou Kerfur, hor mestr, a zo erruet er maner.

Biel gos. N'eo quet possubl !!

Fanch. Quer possubl a m'en lavaran deoc'h ; ac ar pez a zo guella eo ma choumo eviziquen etouez e vêrourien, èr goân evel èn hân ; quitteat en deus è garg evit tremen ar rest eus è vuez è peoc'h ac è tranquilite.

Biel. N'oas quet evit annonç deomp eur c'helou agreaploc'h. N'eus dén èr c'harter a

na ve joa gantâ clevet quemmen-se : roues int
 èn amser-mâ ar vistri henvel oud an Aoutrou
 Kerfur ; eun tad n'en deus quet mui à sourci
 eus ê vugale eguet n'en deus eus ê fermourien
 ac ê servicheurien.

Yan. Guir a lavar Biel gos ; me m'eus
 souch mad eus an derves ma torris va c'har
 ha ma lazis va marc'h limoun o tisquen èn
 traon bihan. En istant ma clêvas an Aoutrou
 ar malheur a yoa erruet ganeên , e teuas e-
 unan d'am zy , ac evit va c'honsoli e lavaras
 dign pilat gues divar ê zouar evit ober eur
 c'har nèves ; ac ouspen , emezâ , chetu aze
 anter cant scoet evit sicour prena eul loan all.

Fanch. Iit da glasq mistri ar seurt-se è
 toues ar voure'hizien pere ne vezont na var
 dro ilis na var dro bêlec ! Compzit dign eus
 eur mestr ac en deus feis ha religion evel
 an Aoutrou Kerfur.

Biel. Pebes tensor evit ar c'harter ! ne ou-
 femp quet trugarecaat aoualc'h an Aoutrou
 Doue da veza roët deomp eur mestr quer
 charitapl. Me zo avis e zafemp var c'hoas
 da renta ar bonjour d'an Aoutrou Kerfur ha
 d'ê famill : eun dever eo evidomp , sûr ousp
 da veza diguemeret mad.

Glaoda. Ha pep à vannahic *odevi* hon de-
 vezo ive , pe me vezo tromplet.

Biel. Ema Yan glapezen adarrè gant ê
 vanneou ; n'en deus quen souch : laquit

eves, camaradic, ne ve tom do peg, rac an Aoutrou-ze ne gar nemeur an eveurien odevi.

Glaoda. Oh ! bezit disourci, me hoar peur eva odevi, nequet eur babic a zo e dillat Glaoda !

Fanch. Pebes distagueur eo emâ ar Glaoda-mâ !

Yan. Ya, ennès a zo eun artizan !

Biel. Ne quet question plezanti eo ; var-c'hoas var dro diveur, ec'h en-em gafimp tout è hars dor bors ar maner, ha pa santimp evezo echu lein e c'houlennimp digor.

Glaoda. Evidon-me ne vanquign quet d'ar galf.

Biel gos ac e goumpagnunès a ya dar maner.

N'oa quet eun heur anter ma edo ar verourien è hars dor bors ar maner ; ha Biel gos e penn ar vanden. Ar c'heguineur, hanvet Pierro, ho remercas ac a redas ractal da avertissa an aoutrou Kerfur pehini a ordrenas ma vige digoret dezo.

Biel. Quemeret a reomp, Aoutrou, an hardiziègues da zont d'ho saludi ; n'oump quet evit lavaret ar joa hon eus ous ho coëlet erruet en hon toues.

An Aoutrou. Eur bligeadur vras a rit dign. Pierro, digaç cadoriou ha discarg pep à vanne d'ar botret chentil-mâ.

Glaoda (goustadic). Ne m'oa-me quet lavaret deoc'h hon devige pep à c'houzougadic ?

Yan. Ro peoc'h, serr da c'hinou.

An Aoutrou. Penaos ec'h en-em gavit-hu, Biel, ne gavan chenchamant ebet enoc'h abaoue varlene ?

Biel. Seder atao, aoutrou Kerfur; evel-quent e santan ar blaveziou o poëza var va discoas, an oat a hermet, n'oump quet evit miret ous an amzer da vont en dro.

An Aoutrou. Pe oat oc'h-eus, Biel ?

Biel. Dec vloas à tri-uguent, ne d'oun mui yaouanc evel a velit.

An Aoutrou. Allas tra, Biel, me zo quer cos à c'hui, nemet eur bloas. Ha c'hui, potret, yac'h ouc'h bet abaoue varlene; evit bremà n'oc'h-eus quet an ear da veza clân ?

Glaoda. Potret gaillard bepret, pa blich gant Doue.

An Aoutrou. Clevet em eus lavaret oc'h eus bet eun eost mad, chetu c'hui sûr a vara evit eur pennat blavez. Mes arabat eo deoc'h ancounac'haat eo Doue a ra dar greun diouan, cresqui ha prosperi; caer ho pe labourat, ho labour ac ho poan a ve bepret inutil eb benediction Doue.

Biel. Guir a livirit, Aoutrou.

An Aoutrou. Epad an eost n'oc'h eus quet bet cals à amzer d'en-em occupi eus ho teveriou à religion, mès bremà p'eo echu al labourou bras ne vancoc'h quet da vont prest da goves. N'eo quet aoualc'h en-em occupi eus ar c'horf, ret eo caout soingn eus hon éné pehini a zo preciussoc'h eguet oll vadou ar bed-mâ.

Biel. An aoutrou persoun, dissul diveza en deus lavaret deomp quemenn-se. Rapportet en deus deomp ar pezh a lavar Jesus-Christ èn aviel : *petra servich d'an dén gounit ar bed-mâ èn antier, mar en deus ar malheur da goll è ené.*

An Aoutrou. Eun dever eo evidoc'h mont da drugarecaat Doue da veza roët deoc'h greün èn abondanç. N'eus rum dud ebet da bere e ve quen eas mont d'ar barados evel ma'z eo d'ar baïsantet.

Glaoda. Daoust perac ?

An Aoutrou. Doue en deus condaounet an dén da labourat, ac an nep ne labour quet, eme sant Paol, ne dle quet dibri; hoguen piou ho deus rustoc'h labourou eguet ho deus an dyeïen, an dud divar ar meas ? evel-se-tà ma carfent offr ho foan da Zoue e c'hounessent ar barados èn eur labourat an douar.

Glaoda. Penaos songeal e Doue pa vezomp oc'h arat pe o charreat, re occupet evezomp ni neuze ?

An Aoutrou. Gouzout a ran n'eo quet possubl deoc'h songeal bep heur ha bep momet en Aoutrou Doue, mes petra vir ouzoc'h pa zavit dious ar mintin, ac eur veach en amzer epad an deis, da offr da Zoue ho labour ac oc'h oll boaniou? ar poaniou-se offret da Zoue gant eur speret à binigen a ve profitabl bras evit ho silvidigues. Sant Isidor ha cals à sent all ho deus en-em santifiet o labourat an douar.

Biel. Evel-se a dlefemp sûr da ober, mès n'int quet stanc al laboureurien a ve sourcius da santifia ho foan ac ho labour; ne ouzoun quet pe seurt christenien a zo en amzer-mâ; bremà ne glêfac'h èr parkeïer, èr charreou, èn oll assambleou, nemet sacreou, bavar-diach, à bep seurt compsou vil; ne glêfach quen caos nemet caos an dançou, caos ar c'hartou, caos an *odevi*; an eil a zo occupet da zecrial eguile, ne respeteur quet mèmès reputation ar velêyen.

An Aoutrou. Tostaat a ra ar pardaes, poent eo deomp finissa; credi a ran e tiztrooc'h d'am guelet. Er poent bloas-mâ eo hir an nos; mar quirit e tremenimp bep sul d'abardaes eun heur pe ziu assablès. En eur varvaillat ec'h ellimp parlant eus ar religion, non pas evit ê decrial mes evit ê meuli. Nep ne glef nemet eur c'hloc'h ne gleo nemet eur soun; èr foariou ac èr marc'hajou ac è meur à occasion all e clevit decrial ar religion ac

ar velêyen ; hebian no pezo nemet rapporti dign ar pezo oc'h-eus clewet var ar poent-se, ha me a zesco deoc'h gant piou emâ ar vriones, pe gant ar velêyen pere a glasq ober christenien vad ac'hanoc'h, pe gant ar fals doctoret pere a garfe ho caç da bayanet. Countant ouc'hui eus à guemen-se ?

Biel. Countant bras, Aoutrou, ne c'houlennomp quet guell eguet beza instruet,

Glaoda. Evidon-me ne vanquign sulvez ebet.

Fanch. Na me.

Yan. Na me quen nebeut.

Chetu' ni accord, nos vad deoc'h, quen avezo dissul.

QUENTA BEILLADEC.

Eur follentes vras eo refus credi ar religion ac ar mysterious, etc.

An Aoutrou. An amzer a zo fresq, tostait, va mignounet, azevit e quichen an tân evit ma hellimp caozeal en hon eas. Promettet em eus deoc'h parlant eus ar religion pehini e deus cals adversourien en amzer-mâ. Clewet oc'h-eus meur à veach en instructionou ho pastor ar pezo a levirign deoc'h, mès ne quet da lavaret ho pe comprenet mad quement

oc'h-eus clevet ; ha goude tout ne oufac'h
quet beza re instruet eus ho religion ; nemet
c'assoc'h aze ne vezo deoc'h instrui ho pu-
gale ac ho tometiquet : an ignoranc a zo
ar sourcen eus à gals pec'hejou.

Biel gos. Expliquit deomp , me ho ped ,
petra eo ar religion.

An Aoutrou. Ar religion a zo eun honor a
rentomp d'ar guir Doue , drè ar sacrific eus
hor speret , o credi fermamant ar guirione-
ziou ên deus discleriet deomp ; dan eil , drè
ar sacrific eus hor c'haloun , o pratica ar
vertuziou conform d'ê lèzen , da lavaret eo ,
oc'h observi gourc'hemennou Doue ha re an
Ilis. Evel-se èr c'hatechismou e levereur
penaos evit beza eur c'hristen mad e ren-
queur credi doctrin Jesus-Christ ac ê lacat
è pratic.

Fanch. Beza ez eus cals tud ac o deus
poan o credi doctrin Jesus-Christ ha muioc'h
choas ous ê lacat è pratic.

An Aoutrou. Gouscoudé ac e zo netra justoc'h
eguet an obligation da zoumetti hor speret
dar guirioneziou en deus Doue discleriet ha
revelet deomp ?

Ac e zo netra honoraploc'h eguet heulia
bolontes Doue ên hon oll actionou ? Mar
deo honorapl servicha Princet ha Rouanes ,
eo honoraploc'h mil gueach servicha Roue an
oll Rouanes , mestr an eên ac an douar.

Fanch. Poanius eo, a leveront, credi traou pere ne hellomp quet da gompren.

An Aoutrou. Doue oc'h ordren deomp credi ar mysteriou eus ar religion ne ordren quet deomp o c'hompren. Mès evel ma c'houzomp penaos Doue ne hell quet hon trompla, e tleomp credi, eb an disterra douetanç, que-ment en deus revelet deomp. Speret an dén a zo ber ha carguet à dervaligen, n'eo quet età estounapl ne halfe quet compren quement a ordren Doue deomp da gredi. N'eus nemet an ourgouil ac a rafe deomp caout poan o credi ar mysteriou eus ar religion.

Glaoda. Petra sinifi ar guer-se, *Myster* ?

An Aoutrou. Eur myster a zo eun dra cuzet ouzomp ac incomprenabl d'hor speret.

Ha ped tra zo a gredomp eb o c'hompren ? eun den dall, pehini n'en deus biscoas guelet sclerigen, ne gompren quet petra eo ar melen, an du, ar rus, ar glas, ar guen, ha rezoun en defe da lavaret penaos n'eus na glas na melen etc. ?

Glaoda. Nan sùr.

An Aoutrou. C'hui a c'hal-fe explica petra eo an avel pe ar gurun ?

Yan. Salocraç, mès evel ato e credan an traou-se, surtout pa velan va c'holo sclabezet gant an avel.

An Aoutrou. Eur follentez eo età refus credi mysteriou ar feis var digares m'az int incomprenapl ?

Yan. Ya certain.

Glaoda. Clevet em eus meur à hini o lavaret : *ne gredign ma na velan.*

An Aoutrou. Ha credi a rit ez eus eur gear hanvet Paris ?

Glaoda. Dommach, ha n'eo quet è Paris e ra ar Roue e zemeuranç !

An Aoutrou. Pet gueach ouchui bet e Paris ?

Glaoda. Oh ! gueach ebet, n'houn quet bed quer pell-se dious ar gear.

Yan. Ne vige quet possubl parlant outà ma vige distroet eus à Baris !

An Aoutrou. Credi a rit età eb beza guelet ?

Glaoda. Ouspen cant gueach em eus clevet parlant eus à gear Paris, compset em-eus mémès gant meur à hini eus ar vro-mâ pere a zo bet enni èn amzer ma'z oant soudardet.

An Aoutrou. Ha ni ive a dle credi doctrin Jesus-Christ abalamour an Ebestel ho deus anduret ar maro, ar verzerenti evit souten an doctrin-ze, pehini o doa desquet gant Jesus-Christ è-unan, ha pehini a zo deut betec enomp eus an eil rum dud d'eguile.

Lavaret en eur barlant eus à vysteriou ar feis : *Ne gredign ma na velan*, a zo evel pa lavarfe eur c'hraouadur bihan : *N'houn quet evit credi eve eur gear hanvet Brest*, pa n'em eus quet ê guelec.

Glaoda. Gouscoude n'eus netra surroc'h, me zo bet è Brest ouspen cant gueach.

An Aoutrou. Credi a reomp età meur à dra pere ne gomprenomp quet, ha pere ne velomp quet. Plegomp ive hon rèsoun ourgouillus ha credomp, è guir disquibien da Jesus-Christ, an oll guirioneziou eus ar religion.

Yan. Ne gavan quet e ve eun dishenor credi eb douetanç ar pez en deus Doue revelet deomp, pe guir e credomp cals traou a glevomp da lavaret gant tud evel-domp.

Glaoda. Certen tud a lavar n'eus Doue ebet, n'eus na barados nac ifern.

An Aoutrou. Credi a rit-hu quemense, Glaoda?

Glaoda. Doue ram preservo ! evelquent ar re a barlant er c'his-se a bretant beza potret habil.

Yan. Ar seurt tud-se a zo laboucet treud a gredan-me !

Fanch. Assur, cos laquzien pere n'o deus na feis na religion.

An Aoutrou. Parlant mad a rit, potret ; ne deus nemet tud impi ha disquiant ac a lavarfe

n'eus Doue ebet. Petra respount-fe an doctoret-se ma ve goulennet diganto piou en deus great an eên, ar mor, an douar ha quemement a zo ennò ; piou a laca an heol da bara èr firmamant, an avel da c'hoëza, ar gurun da grozal, ar greun da ziouan, èn eur guer quemement a velomp èn dro deomp.

Glaoda. Lavaret a reont evit ho rèsoun penaos ar bed a zo great er fèçoun ma emâ drè hazard pe drè chanç.

An Aoutrou. Ma clefac'h unan bennac o lavaret, pa zoun an heuriou, penaos quemense ne erru nemet drè hazard ha drè chanç, ha c'hui n'o pe quet à boan o viret da c'hoarzin ?

Yan. Ret eo età credi penaos an horolach ac ar c'hloc'h a zo en tour ho deus en-em c'hreat ho hunan ac a zo en-em gavet èn ho flaç drè vertus an hazard !

Fanch. Oh ! chetu enò eun histor all ! en taill va c'har ha va c'hillourou-me a zo great ive drè chanç ? drolla chanç ! gouzout a ran peur ha gant piou int great, rac paëa em eus ranquet an oberianç, an artizanet ne labourout ha ne vezont quet paët drè hazard na drè chanç. Me ne d'houn nemet eun azen, mès habil aoualc'h houn evit gouzout penaos n'eus nemet Doue ac en defe gallet croui ha furmi ar bed ; n'eus injinieur ebet nac è Brest nac è Paris ac en defe gallet biscoas ober an disterra tra eus à netra. Me garfe gouzout

eus à be seurt squeul ho deus én-em ser-
vichet an artizanet-se evit lacaât an heol èr
firmamant.

An Aoutrou. N'em bige quet sounget evige
bet Fanch quen habil : petra ne emâ doctoret
Glaoda oud èr selaou , me zo sùr ne vigent
quet bet tentet da lavaret pelloc'h ne deus
Doue ebet ?

Glaoda. Lavaret a reont penaos n'eus na
barados nac ifern.

Biel. Couls eve lavaret penaos ne doump
oll nemet loenet pere n'o deus ené ebet na
da goll na da zaveteï.

Fanch. Ya sùr ; cals à henoꝝ a ra an doc-
toret-se dezo ha deomp-ni ; en-em lacaat a
reont è renq ar chaç ha respet deoc'h , ar
m'oc'h !

Yan. Tud ha chatal e tleomp mervel eb
esperanç da veza eürus nac eb aoun da veza
maleürus. Chetu enò eun doctrin consolant
bras evidom-ni pere non deus nemet poan
var an douar ! ar muntreur ac an den ver-
tuzus n'ho deus nemet ar mémès sort da
hedal ! caëra lèzen , caëra creden ! oh , evi-
don-me mar guellan , ne zign quet da va-
rados ar chaç , hemâ ar Glaoda-mâ a yelo ,
mar car , assablès gant è zoctoret.

An Aoutrou. Ac'hanta , paot chentil , chetu
aze eur flippat ac a stag du !

Biel. Yan a zo lem e douchen , ha dén ne sounche.

Glaoda. Bennos Doue, da Yan evit e gomplimant , me'm eus esperanç ive da vont da varados ar gristennien.

An Aoutrou. Arabat eo en-em facha.

Glaoda. En-em fachtet nep a garo ; evidon-me am be labour ma ranquen en-em facha bep veach ma vezan flemmet gant Yan.

An Aoutrou. Quercouls eo deomp finissa evit hirio , ha ne quet , Biel ?

Biel. Pa bligeo guaneoc'h , Aoutrou , evidon-me n'em eus quet cavet hir an nosves.

Fanch. Na me , eur bligeadur estranch am eus bet.

An Aoutrou. Hebian , mar douc'h countant e teuoc'h adarrè dissul.

Biel, Fanch, Yan. Ne vamquimp quet , nôs vad , Aoutrou , yhedou.

Glaoda. Chentila dén eo an Aoutrou Kerfur !

Biel. Chetu enò eun dén à religion ac à zougeanç Doue ! Ennès n'eo quet henvel ous ar vourc'hizien yaouanc pere ho deus méz oc'h ober sin ar groas.

EIL BEILLADEC.

Eus ar pes a levereur enep ar veléyen.

An Aoutrou. Crissoc'h crissoc'h e teu an amzer ; bremà e ra vad caout keuneut da ober tân.

Yan. Ya sûr. Intanvès Jacquès ar Bihan ac hê bugaligou a vige maro gant ar riuou anès m'en deus bet an aoutrou persoun ar vadèlez da furnissa dezo bouteïer ha dillat d'en-em c'holo.

Biel. Ne ouffemp quet trugarecâat aoualc'h an Aoutrou Doue da veza roët deomp eur persoun quer charitabl ; n'en deus netra evitân ê-unan ; eun tad n'en deus quet mui à sourci eus ê vugale eguet n'en deus eus ê barriisionis ha particulièrement eus ar beorien.

Fanch. Ma ve an oll dud pinvidic quer charitabl ar beorien ne ve quet quen truezus ho doare.

Glaoda. En despet d'ê charite ha d'ê aluzennou an aoutrou persoun n'eo quet caret gant an oll. Me a anaves iniennou èr barres pere n'ho deus nemeur à joa outân.

Biel. N'eo quet possubl pligeout d'an oll. Beza ez eus tud pere n'ho deus jamès vad da lavaret eus à zén ac ispicial eus ar veléyen.

An Aoutrou. Evit clevet cos laquizien eusà guear o parlant enep ar velêyen, n'hounquet souezet, rac ar seurt tud-se ne anavezont quet mêmès belêyen ho farres; mès clevet paisantet o trouc-prezec eus ho belêyen, ne gavan netra estounaploc'h. Ar velêyen a zo tud savet èn ho toues, tud eus ar vro, ho querent, ho preudeur, ho mignounet, ac è zit do decrial? mont a rit d'an ofèren, mont a rit da goves, ober a rit profession da veza christennien ac ec'h en-em amuzit da zrouc-prezec ministret an Doue a adorit? Eur persoun en è barres a zo evel eun tad è creis è famill; henori ha respeti a dleomp età hor pastor evel hon tad spirituel. Me garfe gouzout petra ho deus ar baïsantet da lavaret eus ar velêyen; anès ar religion ac ar velêyen an dud divar ar meas a vige sovag ha brutal evel loënet gouës; n'o deus quasi dén d'ho instrui nemet ho belêyen ac o deus an ingrateuri d'ho decrial! Pell-zo e clasq an dud impi ar voyen da ober dar baïsantet abandonni ho religion ha disprigeout ho belêyen.

Biel. Me am eus guelet eun amzer ne barlantet eus ar velêyen nemet gant respet, ha bremà n'ouc'h quet evit mont è toues dén eb clèvet eur gomps injurius bennac anezo. Pa vezeur èr parc o varrat, o palat pe o vidi e lavaro unan: æssa tud eo ar velêyen, ar seurt tud-se a c'hounit ho arc'hant diboan! pa deuer dar pred, dar repas, e lavaro eun

all : ên zo ebat dar velêyen o deus cunduvad ha guin da eva ous ho sec'het ! quement persoun ha curé a zo èr c'hanton a vezo cavet abeg ennâ ; unan zo re interesset abalamour n'eo quet brocus aoualc'h gant ê vin ; uen all a zo lagudus gant ê servich , pe a choum reir er gador.

Glaoda. Guir pater eo quemen-se ; caos ar velêyen a vez aliès var an tapis , ha peur liessa e ves dispennet ho zoudanen.

Aoutrou. Examinomp hirio , pa hon eus amzer , ar rebechou ordinal a rear d'ar velêyen ; selaouit ha comprenit mad ar pez a lavarign deoc'h ac e c'hanavessot pe guen injust eo ar rebechou-ze.

N'hoump quet galvet oll d'ar mêmès stad à vuez , na destinet d'ar mêmès labourou. Ma ve an oll o tyecaat non defe quet a zillat d'en-em c'holo : muioc'h à boan ac à fatie a zo èn eil micher eguet èn ê ben ; rustoc'h eo labour an tyec eguet labour ar c'heme-neur ; labour ar martolot eguet labour ar c'habiten ; ha gouscoude an oll micheriu-ze a zo necesser ac util evit ar societe. N'eus micher ebet è pehini ne ve eun diezamant bennac. Ar baïsantet a gred n'eus nemeto ac o defe poan var an douar , abalamour ne santont quet poan ar re all. Avi ho deus ous stad ar velêyen pere ne vezont quet èr parc o labourat. Pa velit ho persoun o pourmen ,

ê vreuvier d'indan e vreat'h, em-ouc'h prest da lavaret : *æssa tud eo ar velêyen!* Mès ne soungit morse er boan en deus ho persoun, pe ho cure, pa rancq sevel, à greis ê gousq, evit mont, èn despet d'ar goal amzer, da velet eun dén clân eul leo ha diou marteze dious ar gear. C'hui a vezo o fumi o pi-bennat, tranquil è c'hars an tân, ac ho persoun a vezo d'an heur-se o redet drè an erc'h, ar vouillen ac al laguen. Lavarit dign piou eo an ebata ê zoare neuze? Ha c'hui a garfe tostaat ous guele an dén-ze clân gant eur c'hlenvet pegus, ac en-em exposi da baca ho maro er c'his-se evel ma'z eo erruet gant eun niver bras à velêyen?

Fanch. Evidon-me a zo guell ganeên caout eun dra muioc'h à labour epad an deis a choum da repos em guele epad an nôt.

An Aoutrou. Pa ranquit er goân, choum diou na teir heur da c'hedal ho tro da goves, ec'hen-em glèmit, ouc'h sclacet gant ar riou, mès ne remerquit quet poan ho confessour pehini a dremen teir pe beder heur bep sul vintin, ac è cals à barreziou bemdes, èn e gonfession, obliget da choum enò adalec ar c'henta betec an diveza. Ne barlantan quet amà eus an ambarras à speret ac eus à gals à boaniou all pere ne gomprenit quet aoualc'h. Guelet a rit penaos mar ho deus ar velêyen ho momejou à eazamant ho deus ive ho momejou à ziezamant.

Yan. Ac'hantà, Glaoda, petra oc'h eus da respount da rëzouniou an Aoutrou?

Glaoda. Ar velêyen, da viana mar o deus poan a ra cher-vad.

An Aoutrou. C'hui a garfe età, Glaoda, condaoni ar velêyen da zibri bep repas bara tors, patates pe yôt? Ar velêyen ne vezont quet o commandi d'ho creg petra da brepari deoc'h d'ho pred, roït ar mêmès liberte da blac'het ar velêyen. Avi oc'h eus oud ar cher-vad a ra ar velêyen, mës an darn-vuya anezo n'o deus quet guelloc'h cundu eguet ne deus en tyeguezion mad var ar meas. Me anaves meur à bersoun pere a zêbr, quasi bemdès yôt, crampoes, pe batates. Daoust pe guer pinvidic o c'hredit n'o deus quet ar voyen, ha pa felfe dezo, da ober frico bemdès.

Glaoda. Ni ne evomp quet a vin bemdès ac ar velêyen a ra?

An Aoutrou. Ne ouzoun quet pe y a ef guin bemdès pe ne reont quet; ar pez a ouzoun eo e zeus cals à baïsantet, ac è Leon ac è Kerné, ac a hal-fe caout eur banne guin bep repas ma carfent eva nebutoc'h da sul ha da zeis marc'hat. Me zo sûr, Glaoda, eb mont larcoc'h, e c'hevit, c'hui, mui a vin da sul eguet na ef an aoutrou persoun epad ar sizun.

Yan. Ac'hantà, Glaoda, chetu aze eur friat adarrè!

Glaoda. Nac al leinou bras a ves great er presbytalioù ?

An Aoutrou. Pa velit daou pe dri bêlec o tont da velet ho persoun. E songit ac e lavarit ractal : lein vras a zo hirio er presbytal, ha d'an ampoent ma parlantit evel-se ar gueguineures a zo marteze nec'het o clasq gouzout petra da brepari da lein ; marteze ne gavo en ty nemet eun nebeut viou. Quemenn-se a zo erruet ouспен en eur presbytal pa lavare darn eus ar barrissionis ar pezh a lavare Glaoda bremà-souden.

Ha divennet eo ous ar velêyen en-em zaremredi ? ar velêyen a ya an eil da dy eguile evit ar bligeadur da varvaillat eur momet assablès ; n'ho deus quen diver amzer è creis ho labourou ecclesiastic ? Ha credi a rit-hu e zafe an aoutrou persoun da ober diou na teir leo gant coëtis caout cher-vad ? C'hui a varn ar re all diouzoc'h oc'h-unan.

Yan. Eves, Glaoda, touchet eo da borpant !

An Aoutrou. Me am eus bet an henor da leïna meur à veach è compagnunes belêyen, ac a hell assuri penaos aliès eveze evet muioc'h à zour eguet à vin. Ac ouспен tout, n'eo quet ar velêyen ebquen ho deus guin en ho frejou ; n'o clêvan jamès o parlant eus an dudchentilou ac eus ar vourc'hizien pinvidic pere ho deus mui à voyen da ober cher-vad eguet n'o deus ar velêyen.

Glaoda. An oll a lavar gouscoude penaos ar velêyen a zo pinvidic bras.

An Aoutrou. Ar pez a lavar *an oll* ne vez quet ato guir, seblantout a rafe ous o clevet e tiouan—fe an aour ac an arc'hant è godellou ar velêyen. Lavarit dign, mar plich, eus à beleac'h ho deus ar velêyen ar madou bras à bere e parlantit.

Glaoda. Eus à beleac'h? ar velêyen ne reont netra eb paëmant.

An Aoutrou. Ha ne vez quet ho pugale èr c'hatec'hismou?

Glaoda. Eo certen.

An Aoutrou. Peguement a roït dar velêyen evit ober catec'hismou d'ho pugale?

Glaoda. Oh! netra.

An Aoutrou. Pa vezit o coves, ha paëa a ranquit?

Glaoda. Nan à vad.

An Aoutrou. Gouscoude n'eo quet eur bli-geadur evit ar velêyen terri ho fenn evit quelen ho pugale na passeal diou, teir na peder heur èr confession.

Pa zit da glasq ho persoun pe ho cure da zont da velet ho tad pe ho mam è guele ar maro a paëmant a c'houlennont digua-neoc'h?

Glaoda. Oh ! nan à vad.

An Aoutrou. Guelet a rit età penaos ar velêyen ne recevont quet an disterra tra evit renta deoc'h ar servichou ar re boanniussa, evit ar pez zo diessa èn ho stad.

Fanch. Paquet oump adarrè camaradic !

Yan. Va c'houmper a zo lampric mad è deot !

Glaoda. Mès ar velêyen a ya da gualal.

An Aoutrou. N'eo quet ar pez a zo aviussa èn ho stad. Mès penaos e c'halfent beva ma na recefent netra ? an hini en deus tud en e servich a ranq o faëa ; ar velêyen a zo epad ar bloas, èn nòs evel èn deis è servich an disterra ac'hanoc'h, ha ne gavit quet just e zafent da gualal ?

Glaoda. Paët int gant ar c'houarnamant.

An Aoutrou. Ar c'houarnamant ne accord d'ar velêyen nemet eur soum dister, o credi penaos ar bopl christen a bourveo d'ho oll izomou. A veac'h o deus peadra gant ar pez a recevont digant ar c'houarnamant d'en-em veva ha d'en-em visca. Ar bêlec a dle beva dious an aoter evel an tyec dious è labour. Eur c'hristen mad a dle rei gant joa eul lodennic eus ar pez en deus evit antreteni ar re o deus en-em gonsacret d'è instrui. Doue & unan en doa ordrenet el lèzen ancien offr èn

templ d'ar velêyen eul loden eus à froues an douar.

Biel. Me zo cos ha n'am eus quen souch nemet da velet ar velêyen o questal bep bloas. Gueichall an derves ma teue an aoutrou persoun da ggestal a yoa eun derves à joa evit ar barres. Paour ha pinvidic oll e vezet countant d'èn receo ha da bartagi gantâ. Gouscoude èn amzer-se e vevet couls à bremà; mès hirio an dud a zo quen interesset ma na gaf dezo jamès caout aoualc'h a zanzès evit prena levé, dillat nèves, evit mont da roulli èn tavagnou. Évidon-me n'houn quet pinvidic ac a ya va unan bep bloas da gaç ê ggest d'an aoutrou persoun. N'em eus quet aoun e ve ar velêyen re binvidic; salo e vent en o eas rac ar beorien a brofit-fe. Penaos e hello an aoutrou persoun soulagi ar beorien clân, ar beorien mezus, ma ne roomp netra dezâ?

Fanch. Guir a levirit : neus quet pell em eus guelet an aoutrou persoun o rei eur pez à uguent real da eur paour eus ar c'harter pehini ne grede quet mont da glasq.

Yan. Me a anaves cals peorien da bere ê pourçaç bouteïer epad ar goan. Perac en-em glem abalamour ma teu ar velêyen da ggestal ? pep-unan a ro ervez ê fantazi, ne gontra-gneur dén da rei ho c'hest dezo.

An Aoutrou. Coumzet mad, Yan ; mes ar re

ne reont netra eo a zo muia trous ganto ; ha goude c'hoas pa zaï an seurt tud-se d'ar presbytal e vezint drouc countant ma n'ho debes eur banne guin.

Yan. Guir *pater*, ac iniennou all pa roont eun tamoëziat guinis d'an aoutrou persoun a false dezo dibri ac eva èr presbytal talvoudègues eur boezellat.

An Aoutrou. Quemeret a reont ar presbytal evit eun hostaleri ; seblantout a reont credi eo obliget an aoutrou persoun da rei guin da guement ini a ya de dy.

Biel. Ar velêyen o deus great cals dispignou evit ober ho studi ha diezet ho famill, ne gavan netra justoc'h eguet ho sicour d'ennem antreteni honorablant, anés quemenez piou eo an tad ac a iafe da gaç e vap da vèlec ? Gouscoude ne vezo quet à religion eb belêyen.

An Aoutrou. An dud divar ar meas a laca eves ous gounidègues ar velêyen, mès jamès ous an dispign ho deus. Seblantout a ra e halfe an aoutrou persoun paëa plac'h ha mevel gant coumsou ac ho beva gant avel. Quezec ar re all a zèbr foën, colo, querc'h pe banes, mès marc'h an aoutrou persoun a vevo gant ear an amzer ! Ar velêyen, guir eo, ho deus guell gounidègues eguet an darn vuya eus ar baïsantet, mès mui à zispign ho deus ive. Ha goude tout petra eo gounidègues ar velêyen

comparachet ous hini cals tud pere a zo èr plaçou ac er c'hargou huel. Ma charge an darn vuyà eus ar velêyen gant ho descadures, beza en-em rentet alvocadet, noteret, medicinet, ho divige bet muioc'h à c'hounidègues ha nebutoc'h à garg dirac Doue. E pep amser ez eus bet tud paour ha tud pinvidic, ha quemmen-se a c'hoarvezo bete fin ar bed.

Fanch. Hebian, Glaoda, petra oc'h eus da respount d'ar rèsoniou-se ?

Glaoda. Me n'em eus great nemet rapporti ar pez oc'h eus clewet, pep unan ac'hanoc'h couls à me. Dén ne istim muioc'h ar religion ac ar velêyen evit ne ran-me; ingrat bras e ven ma na garfen an aoutrou persoun, pehini en deus rentet servich dign è meur à occasion.

An Aoutrou. Lavaret a rear, ar velêyen a zo pinvidic ! Anaout a ran cals belêyen, ac assuri a hellan penaos evit eur bêlec ac en deus cant scoët var ê hano e zeus ouspen ugent ac ho deus cant scoët dle.

Yan. Ac'hanta, Glaoda, em-ez-aoun oud eat èr sac'h, da zoctoret n'ho deus mui netra da lavaret.

Glaoda. C'hui, potret, ne glasquit nemet ober d'in-me parlant evit gallout c'hoarzin divar va c'houst, c'hui zo laboucet fin !

Fanch. Diven mad a ra Glaoda ê gaos ;

eun alyocat terrupl e vige bet ; mès allas an ferrupla gourineur en deves lam à veachou , ac ar marc'h ar c'hrênva a rancq puka pa vez re zamet !

An Aoutrou. Alon , Glaoda , ne rit van evit clèvet Yan ha Fanch ; mar oc'h eus c'hoas eun dra bennac da lavaret , hastit buan , rac avanç a ra an nòs.

Glaoda. Souch am eus , eun derves è foar Lannilis da veza clèvet eun trafikeur o lavaret : bah ! ar velêyen n'int quet guelloc'h evidom-ni ; er sizun dremenet eus digacet eur bélec da gastel Brest. Eur boure'his a yoa enò a baëas eur banne dan trafikeur evit encanti ar brud-se.

Yan. M'em bige paët eur banne dezân evit rei peoc'h.

An Aoutrou. Lavaret em eus deoc'h déjà penaos an dud impi ha difeis ne glascont nemet an occasion da ober d'ar baïsantet coll istim evit ar velêyen ; ar pez a gount Glaoda a zo eur breuven nêvez eus à guemen-se.

Ar velêyen a zo tud eveldom-ni ; ar velêguiac'h n'ho exant quet dious an inclination d'an drouc : santelloc'h ha parfetoc'h ec'h ellont beza an eil evit eguile anezo ; n'ho deus morse prezeguet penaos ne bec'hont quet ; barnet e vessint couls à ni dious ho

buez fall pe vad. Jesus-Christ a lavare guei-chall d'ar Iuzevien , o parlant eus ar velêyen : *sentit ous ho c'houmsou ha ne sellit quet ous ho oberou*. Chetu ar pezh a dleomp-ni ive da ober. Ar velêyen a zo carguet d'hon instrui ha d'hon repren , mès ni n'oump quet carguet d'ho barn , nebeutoc'h c'hoas da ziscuill ho defotou mar ho deus.

Eun Impalaer eus à Roum a lavare : ma vel-fen eur bêlec o coëza èn eur pec'het bennac , e lacafen va mantel royal d'èr golo ha d'èr c'huzat. Chetu enò eur guentel evit ar gristennien eus an amzer-mâ pere ne glascont nemet drouc-prezec ar velêyen evel pa vent excusaploch èn ho disurziou abalamour da bec'hejou ar velêyen. E compagnunez Jesus-Christ mèmès ec'h en-em gavas eun treïtour , Judas ; n'eus netra estonapl ha pa deufe , ar pezh zo sûr eur malheur bras , unan eus à zaou-uguent mil bêlec a zo è Franc da fazia divar an hent mad.

Lavaret n'eo quet guelloc'h ar velêyen eguet ar re all , abalamour ma'z eus digacet eur bêlec da gastel Brest , a zo evel pa lavar-fen : eun tyec , eur païsant a zo condaonet d'ar galeou , an dyeïen all n'int quet guelloc'h eguet ennès : mevel an ty all a zo laër , an oll mevellou a zo quel laër ac èn ; greg Pipi a zo mesvieures , ar merc'het all a zo henvel outi.

Yan. Evit va greg-me n'eo quet mes-
vieures, me respount.

Fanch. Var digarès ma veleur eur bêlec
fall, lavaret eo an oll velêyen tud fall; oh!
chetu enò eur fêçoun da rëzouni! Evidon-
me n'em eus studiet nac ar *philosophi* nac
an *theologi* ac a goupren penaos ne dlear
quet teuleur var eur barreziat tud faot unan
ebquen eus ar barres; couls eve lavaret n'eus
dén honest ebet var an douar.

An Aoutrou. Lëzomp età ar velêyen evel
ma zint; respetomp ac henoromp ar velêyen
vad, ha euzomp, evit enor ar gristenach,
faotou ar re ho deus ar malheur da fazia.
Lavaret a elleur penaos e nep amzer be-
lêyen Franç n'int quet bet direbechoc'h ha
dinoç'h ha respet. Pedomp Doue da rei de
Ilis belêyen santel. Eur pastor vertuzus a zo
eun tensor precius evit eur barres. Oc'h
heulia avizou ho pastoret e querzot èn hent
eün. Ma carfe an dud mont da glevet euzul
digant ho fastor e ve nebeutoc'h à brocezou.

En-em zalc'hit var evez ous ar goal deodou
pere n'ho deus nemet drouc da lavaret eus
ar bastoret. Guezit ervad penaos an dud
difeis a laca exprès sevel brudaillou fall
evit dua reputation ar velêyen. An tadou
ac ar pennou tyègues a zo coupabl bras o
permetti rapporti dirac ho bugale ac ho
servicheurien ar brudaillou-ze.

Bezomp fidel d'hon religion ha d'hor belêyen èn aoun ne deufe Doue d'hor punissa. Biel ha me hon eus guelet eun amzer ma persecutet ar velêyen. Hounnès a yoa eun amzer trist meurbet. Eb belêyen, eur veach c'hoas, n'eus quet à religion, ac eb religion n'eus nemet dizurs, laëronci, troumplères, lazères, muntrou.

Biel. Pliget gant Doue ne vo guelet mui eun amzer quen anquennius !

An Aoutrou. Diouallit ive ous coumsou treitour ar re a dui da barlant deoc'h eus ar velêyen galvet *protestantet*, belêyen saos pere a zo dimezet, ho deus greg ha bugale ha pere a glasq en-em etablissa è Breis-izel. Ho pezet souch penaos ar religion catholic, apostolic ha romen eo ar guir religion ; e meas anizi n'eus silvidigues ebet evidomp.

Fanch. Evidon-me, gant graç Doue, ne renoncign biquen d'ar religion catholic. Va zad cos a zo bet guillotinet en amzer ar revolution abalamour ma ne c'hoantea quet mont da oféren ar velêyen sermantet, ha me a varvo ive quent eguet trei quein da bastoret an Ilis, quent eguet heulia ar vinistret pe velêyen *protestantet*.

Yan. Ya, marvel quent eguet renonc Jésus-Christ, ar verzerenti a zigor deomp dor ar barados.

Fanch. Me ne glèvan nemet mesvieurien , friponet , lamponaillet , tud libertin o crial enep ar velêyen ac enep ar religion. Ar voure'hizien fûr , honest ha reglet mad a respet ar religion ac ar velêyen.

Yan. Ar velêyen ho deus mistri evit ho dialben pa faziont.

An Aoutrou. An escop è pep escopti , a zo carguet da bunissa ar velêyen a fazi , guelet a reomp avichou exemplou à guemen-se.

An escop ive , ervez ma caf à bropos , a chench persounet ha cureet èr parreziou , ac eur follentez eo e damal abalamour d'ar cheinchamanchou-se. Gouscoude e clèvomp aliès murmuri èr parreziou pa vez cheinchet ar persoun pe ar c'hure.

Yan. Ar merc'het surtout a gustum ba-billat ha jaoguellet var an traou-ze.

Fanch. Eun donger eo ho c'hlèvet ; eb dale an aoutrou'n escop a renco quemeret cuzul digant quement truffen a zo èr barres abars rei e cheinchamant dan aoutrou c'hure. Lèzomp an escop da c'houarn è escopti evel ma c'hentento , ha pedomp ar merc'het da gaout sourci eus ho bugale ha da scuba neat ho zyes.

Glaoda. Me garje e vige bet va greg o clèvet ar c'hompliment-se , marteze e divige jaoguellet nebeutoe'h ac aozet guelloc'h va zamic bouët.

An Aoutrou. Poent eo deomp finissa, ema tost da unnec heur; goal debati hon eus great fenos, ac eo ar Glaoda-mâ zo caos.

Glaoda. Pardoun ac escus a c'houlennan mar em eus lavaret eun dra bennac à re.

An Aoutrou. Cuntunuit, Glaoda, hounnès eo ar fêçoun d'en-em instrui. Tentet e voac'h marteze da gredi coumsou an dud difeis ho poa clêvet o parlant enep ar velêyen, ha bremâ e velit pe guer faos int.

Yan. Noc'heus quet lavaret deomp ha difennet eo d'ar velêyen mont da guestal.

An Aoutrou. Evit c'hoas n'eus lêzen ebet è Franç ac a zifen-fe d'ar velêyen mont da guestal; n'eus età na prefet nâ mear ac o defe droat da viret outo. Bezit sûr penaos ar velêyen a ve countant bras da renonç da guestal, ma ve cresquet ho faëamant; rac n'eo quet eur vicher avius mont da guestal; mès, evel am eus lavaret deoc'h diagent, ar bêlec a dle beva dious an aoter; en-em gonsacret en deus da servich ar bopl fidel, ac ar bopl fidel a dle pourçaç d'ê izomou èn eur fêçoun honorabl.

Fanch. Cals mæriou a gred ec'h ellont miret ous ar velêyen da vont da guestal.

An Aoutrou. En-em droumpla reont.

Biel. Ne gavan netra dereatoc'h eguet an union vad etrè ar mear ac ar persoun èn eur barres.

An Aoutrou. Eun dra gaër eo ac avantachus meurbet evit ar parrezioù.

Nôs-vad deoc'h , quenavo dissul.

TREDE BEILLADEC.

Ar feñoun da glevet ar sarmounioù.

An Aoutrou. Ac'hanta , potret chentil , penaos a rit-hu abaoue dissul ? Me gred ho peza remerquet èr mintin-mâ èn oferen bred. Selaouet oc'h eus-hu pis an instruction en deus great an aoutrou persoun ? Lavarit dime , c'hui Glaoda , eus à betra en deus coumzet an aoutrou persoun ?

Glaoda. Ne ouffen quet cals en lavaret deoc'h ; gouzout a ran en deus embannet merc'h va c'houmper Olier.

An Aoutrou. M'en douete , artizan , em bige ho paquet ; gouscoude ho poa ho lot èn instruction-ze. Rei a rit deomp eur breu-

ven nèvez eus ar pezh a lavare an aoutrou
persoun , penaos an dud nebeuta guiziec
eo ar re a laca ive nebeuta evez ous ar
sarmouniou.

Guelomp , c'hui Yan , var b'etra , var be
seurt sujet en deus prezeguet an aoutrou
persoun ?

Yan. N'em eus quet à souch eus à gue-
ment en deus lavaret , mès evel ato e c'houzon
var be seurt sujet en deus parlantet.

Explicquet en deus deomp penaos eur
c'hristen mad a dle lacat e boan d'en-em
instrui eus è religion , ha penaos ar guella
moyen d'en-em instrui , evidom-ni paisantet ,
eo beza acquetus da assista èn ofèren bred
ha da selaou pis an instructionou a vez
great èr gador pe èr c'hatec'hismou.

An Aoutrou. Va bennos deoc'h , Yan ,
c'hui a zisques noac'h quet cousquet. Ha
c'hui a alfe lavaret pere eo ar guirioneziou
a dle eur c'hristen da c'houzout dindan
boan à zaonation ?

Yan. Ar c'hatec'hismou a zesq deomp pena-
os pep dén a dle gouzout ha credi penaos
n'eus nemet eun Doue infinimant parfet ,
pehini goude ar maro a recompanço an dud
vertuzus ac a bunisso ar re vechant , ar
bec'heurièn obstinet. Anaout ha credi a

dleomp ive myster an dreindet , myster an incarnation ha myster ar redampion.

An Aoutrou. Petra sinifi ar guer-ze , myster.

Yan. En expliquet oc'h eus deomp déjà ; myster a sinifi eun dra cuzet , eun dra incomprenabl da speret an dén.

An Aoutrou. Guelet a ran e tennit profit eus ar pez a glèvit.

Credi a rencomp penaos ez eus eun Doue è tri fersoun , pe evit coums sclearroc'h , e tri fersounach , an Tad , ar Map ac ar Speret-Santel. Ar vriones-se a zo eur myster incomprenabl da speret an dén ; mès ma souengeomp penaos eo Doue ê-unan en deus discleriet ha revelet deomp ar myster-ze , n'hon devezo quet à boan ous êr c'hredi , rac Doue n'eo quet evit hon trompla.

Respountit bremà , c'hui Fanch , pe seurt gouel eus ar bloas a zo instituet evit henori myster an incarnation ?

Fanch. Gouël Nedelec. Oferen an anternôs a zesq deomp penaos Jesus-Christ , map unic da Zoue , ha Doue ê-unan , a c'hanas d'an heur-ze. Pa velan ar c'hinivelez exposet èn Ilis e seblant dign guelet ar mabic Jesus astennet èr c'hraou eus à Vethleem var eun dournadic colo.

An Aoutrou. E pe zeis eus ar bloas e teu an Ilis da celebri myster ar redamption?

Fanch. Da veneur ar groas, abalamour da guenver an deis-se ar Iuzevien a laqueas hor salver dar maro.

An Aoutrou. Livirit è ber goumsou petra eo myster an incarnation.

Fanch. Map Doue, an eil fersoun eus an dreindet en-em c'hreat dén evidomp, evit hor savetei.

An Aoutrou. Petra eo myster ar redamption.

Fanch. Map Doue maro var ar groas evit hon prena.

An Aoutrou. Respountet mad, Fanch; ma charge Glaoda choum diun èr sarmouniou ne vige quet quen azen a ma'z eo.

Glaoda. Lavaret a ran *meâ culpâ*; mès eviziquen me zigoro va discouarn ac a lacai evez èr sarmouniou.

An Aoutrou. Dever ar bastoret eo instrui ho farrissionis, mès dever ar barrissionis eo selou gant respet instructionou ar bastoret. Intantion an Ilis oc'h obligea è bugale da assista liessa ma hellint en ofèren bred eo evit ma clevint an instructionou. Gouscoude e velomp cals christenien pere a garfe mont

bep sul d'an ofèren vintin evit gallout beza liproc'h ar rest pe an demorant eus an deis, ha chetu enò petra zo caos ma'z eus quemant à dud ignorant; darn all a vez ato inouet pa vez great eur pennat instruction èn ofèren bred; seblantout a rafe e vent var ar glaou beo èn Ilis gant ar vall ho deus da zortial.

Glaoda. Evidon-me a renq en anzao, me deu c'hoant cousquet dign evel ma pign ar bèleg er gador.

Yan. Me a oar eur voyen da zerhel Glaoda diun; ma carfe an aoutrou persoun prometti dezà eur banne *odevi*, ne deufe tam c'hoant cousquet d'am artizan.

Biel. Emeur adarrè ganès, paour queas Glaoda.

Glaoda. Petra fell deoc'h, souffir a rancan da c'hedal caout pleg var va bourreovien.

An Aoutrou. Ma carfac'h, Glaoda, n'o pequet à c'hoant cousquet èr sarmouniou.

Glaoda. Ma carfen petra?

An Aoutrou. Ma carfac'h soungéal à zoare vad è peleac'h e vezit; ma veac'h è pales ar roue c'hui a ziuual-fe manific ous ar c'hoant cousquet. Soungit età penaos èn Ilis em ouc'h è ty Zoue ac è presanç Doue

pehini eo roue an oll rouanes. Pa velit ar bêlec o pignat er gador soungit en izoum oc'h eus da veza instruet ; laquit evez-mad var be seurt sujet e vezo great ar sarmoun pe ar gonferanç , selaouit pis ar pez a lavaro ar predicator , evit ma hellot en dizro d'ar gueur rapporti d'ho pugale ar pez ho pezo dalhet en ho memor. Ma carfe an dud a vez o selou an instructionou en-em gomporti er c'his-se , ne ve quet cavet quement à gristenien pere ne anavezont quasi netra eus ho religion.

Biel. Me a anaves eun tad pehini ne vanq morse da interrogi ê vugale ac ê servicheurien var ar sarmouniou pe an instructionou a vez great en Ilis.

An Aoutrou. Va bennos d'ar seurt tadouse ! ac e zo netra mezussoc'h eguet beza clevet eur sarmoun eb beza capabl da lavaret ar sujet anezân ? Clevet em-eus coumps eus eur c'hreg pehini eur sulves d'abardaes a lavare dirac tud ê zy : *terrupta sarmoun en eus great an aoutrou cure , ya chetu enò eur prezegueur !* var betra , eme baot an ofèren vintin , en deus sarmounet an aoutrou cure ? Allas , a respount Jeannet , ne houzoun quet , quer squis oan n'em eus great nemet cousquet epad ar sarmoun. Mad , eme Yan , me zo quen avancet a c'hui , daoust petra bennac ne doun quet bet en ofèren bred.

Glaoda. Bon, hounnès a yoa car tost dime.

An Aoutrou. Profitit eus ar guentel ha desquit choum diun èr sarmouniou. Ar bêlec èr gador a zalc'h plaç Jesus-Christ; ê goumsou a zo coumsou Doue mêmès : *piou bennac ho selaou*, eme Jesus-Christ d'ar velêyen, *em selaou me.*

Fanch. Expliquit deomp, aoutrou, mar plich gueneoc'h, certen termenniou eus à bere ec'h en-em servich aliès ar bredicator, evel ma'z eo ar *scritur sacr*, ar *Batriarchet*, ar *Brofetet*, etc., etc.

An Aoutrou. En ober a rign gant pligeadur, rac guelet a ran e profitit, noc'h eus nemet va interrogi, an eil goude eguile.

Fanch. Expliquit, me ho ped, petra eo ar *scritur sacr*.

An Aoutrou. Ar *scritur sacr* a zo eul levr scrivet gant tud inspiret gant ar Speret-Santel. Adalec commançamant ar bed Doue en deus choaset tud evit annonç ê volontes; an dud-se, n'o deus, na lavaret na scrivet, nemet ar pez a ordrene Doue dezo, na mui na neubeutoc'h; ac evel Doue a zo ar vriones mêmès, quement ho deus scrivet pe lavaret ar Brofetet ac an Ebestel pere a yoa inspiret gant ar Speret-Santel, a renq

beza guir. Evel-se ar bredicatoret evit disques ar vriones eus ar pezh a brezegont a gustum rapporti eur frazen latin tennet eus ar scritur sacr : quement-se zo evel pa lavarfont : *ma na gredit quet d'hor c'houmsou-ni, credit da viana da goumsou Doue.*

Yan. Petra eo an *Testamant ancien* ?

An Aoutrou. An *Testamant ancien* eo al loden pe al levriou eus ar scritur sacr skrivet araoc donediguez Jesus-Christ, pere a zesque d'an Israelitet, a dan oll dud assambles, petra dlient da gredi, da ober a da esperout. Al levriou-se a zesq deomp ive ar pezh a zo erruet abaoe commançamant ar bed.

Fanch. Ac an *Testamant nèvez* ?

An Aoutrou. An Aviel ha scrijou an Ebestel drè bere e c'hanavezomp an urs nèvez a zo pliget gant Doue etablissa drè Jesus-Christ ê vap.

En *Testamant ancien* e velomp ar promessaou a reas Doue de hopl, ac en *Destamant nèvez* e velomp an accomplissamant eus ar promessaou-ze. Al lèzen ancien ne doa nemet ar squeud ac ar figur eus al lèzen nèvez pehini a zo cals santelloc'h ha pehini a zo galvet al lèzen à garantez.

Fanch. Expliquit deomp petra eo ar *Batriarchet*.

An Aoutrou. An hano-ze a roër ordinal d'ar pennou famill pere ho deus bevet araoc pe goude an diluch, betec amzer Moïses, evel Adam, Noe, Abraham, Jacob ac ê zaouzec map pere a zo bet ar pennou pe ar chêfou eus an daouzec Tribu à Israël. Patriarch a zo evel pa lavarfac'h eun dén coz ha venerabl pehini en deus cals bugale cals famill.

Glaoda. Meur a veach em eus clevet parlant eus an diluch, mes biscoas n'em eus clevet explica selear petra eo. Ma carfac'h, Aoutrou, lavaret deomp quemense, e rafac'h pligeadur deomp.

An Aoutrou. Doue evit punissa an dud pere o devoa ancounac'heat ho C'hrouer, a zigaças eur glao bras pehini a badas daouguent dervez ha daouguent nosves; ar meneziou huella a oue goloët gant an dour èn hevelep fêçoun ma perissas oll habitantet an douar, nemet Noë ac ê famill. Noë a yoa eun dén just ha santel pehini avertisset gant Doue a reas eun arc'h pe eul lest bras è pehini ec'h en-em repuas gant ê famill pa velas an diluch o commañç.

Glaoda. Ha bed gueach em oa me clevet parlant eus à arc'h Noë eb compren petra sinifié !

Yan. Petra sinifi eur Profet ?

An Aoutrou. Eun dén inspiret ha carguet gant Doue da annonç é volontes quen evit an amzer bresant, quen evit an amzer da zont. Ar Brofetet eus al lêzen ancien ho deus annoncet donediguez hor Salver meur à gant vloas abars m'eo erruet, ha mêmès cals circonstançou eus ê bassion ac eus ê varo. Abaoue donediguez hor Salver n'eus mui à Brofetet, nemet Sant Yan pehini a zo galvet *Abostol*, *Avieleur a profet*, abalamour Jêsus-Christ ê-unan en deus annoncet ê lêzen dan dud; pa deu an eol da bara, ar stered a goll ho sclêrigen.

➤ *Fanch.* David, erves an doare, a zo bet eur Profet bras, aliès da viana evez caos anezan ?

An Aoutrou. Ya certain. David n'oa nemet eur pastor dêvet pa oue choazet gant Doue evit beza Roue var ar bopl à Israël. N'oa c'hoas nemet eur paotric yaouanc pa lazas eur geant bras, hanvet Goliath, pehini a deue bemdez dirac arme Israël èn eur lavarret : *mar deus eur soudart vaillant en ho toues, n'en deus nemet en-em zisques ha me velo dezân.* An oll a scrige ous e velet, rac horrubl oa bras ha nerzus. David, o veza deuet eun derves da velet ê vreudeur a yoa èn arme, a glêvas coums eus ar geant Goliath : ma car ar Roue, emezâ quer buan, me yelo da rei ê louzou d'ar brabanceur-ze, rac eun estoun eo ne

ve cavet nicun da zialben eur seurt louanguen. O veza obtenet consantamant ar Roue, David a guemer ê valtam ac eun nebeut biliennou : mont a ra rac eün varzu Goliath pehini en-em laca da ober goab eus eur paotric pehini n'en doa barven ebet c'hoas. Gorto, eme David, bremaic souden ni a velo pe seurt paot a zo loget en da zillat; er mêmès istant ar valtam a zourr, ar vilien a barti ac a ya en eur voudal da squei ous tal Goliath pehini a gues d'an douar buanoc'h eguet ar scour trouc'het dious ar vezen. David ne choum quet da zaouzani, redet ara betec ar Geant, quemeret a ra ê zabren, trouc'ha ra ê benn, ac ên digaç a ra gantâ evit ên disques da zoudardet Israël laoueneet oll o velet maro ho brassa adversour.

Glaoda. Chetu aze eun histor gaër ! chetu enò eur paot a lavaran !

An Aoutrou. David o veza Roue a goëzas en eur pec'het bras. Doue ên reprenas drè c'hinou ar Profet Nathan, ha David glac'haret ê galoun a reas pinigen ar rest eus ê vuez. Ar seiz psalm à binigen a zo bet composet gantâ evit goulen pardoun digant Doue. Ar psalmou a ganeur er gousperou a zo bet ive composet gant ar Roue David ha cals a re all ouspen.

Biel. David ac ên a oue pardounet gant Doue ?

An Aoutrou. A dra sùr; Doue a zo ato prest da bardouni ar pec'heur glacharet, ha David, evel m'en lavaren deoc'h brema-souden, a reas pinigen eus ê bec'het; lennit gant evez ar psalmou à binigen ac e velot pe guer bras oa ê gueuz da veza offancet Doue.

Fanch. Petra eo an Ebestel ?

An Aoutrou. Jesus-Christ pa gommanças prezec ê zoctrin a choazas daouzec dén pere ên heulie ordinal ha da bere e c'hordrenas goude ê resurrection mont da brezec an Aviel dre bévar c'horn ar bed. Galvet hint *Ebestel* abalamour ma tlient annonç lèzen Jesus-Christ. An Esquibien ho deus ramplacet an Ebestel pere a yoa ive sujet d'ar maro ha pere ho doa recevet digant Jesus-Christ ar c'hallout da lacat re all da guntunui an ouvrach ho doa commancet, ha chetu an effet eus ar sacramant à *urs*,

Glaoda. An Ebestel a yoa eb douetanç tud habil ha pinvidic ?

An Aoutrou. Nan sùr, ne oant na tud habil na pinvidic. An darn-vuya anezo, evel Sant Per, a yoa pesqueterien, tud eb descadurez ha disprigeabl dirac daoulagat ar bed. Doue en-em servich aliès eus an traou disterra evit accomplissa ê zessinou santel ac evit disques ê c'hallout infinit.

Yan. Perac e parlanteur aliessoc'h eus à Sant Paol eguet eus an Ebestel all ?

An Aoutrou. Abalamour Sant Paol eus à adversour d'ar gristenien a deuas, drè eur burzud eus ar c'hraç, da veza eun Abostol bras pehini a redas cals broyou evit prezee an Aviel ac a anduras cals poaniou evit an hano à Jesus-Christ; ac abalamour m'en deus lèzet mui à scrijou eguet nicun eus an Ebestel all. Sant Paol goude beza convertisset eur vro pe eur guear a yea èn eur vro all; è gustum oa scriva lizerou d'an dud en de-veze convertisset evit ho c'helen, ho c'honsoli ac ho excita da seveni er feis christen.

Yan. Livirit deomp petra eo eur c'honcil.

An Aoutrou. Eur c'honcil a zo eun assemble à Esquibien ac à dud habil galvet gant hon Tad Santel ar Pap evit explica eur poent dies bennac eus ar religion pe evit regli affèrou temporel an Ilis. An Esquibien a zo carguet gant Jesus-Christ da c'houarn ha da gundui è Ilis, da lavaret eo da instrui an dud fidel ha d'ho bleunia èn hent eus ar silvidiguez. Evel-se ar c'hatec'hismou a lavar : *Doue en deus roët d'è Ilis ar c'hallout da ober gourc'hemennou ac en deus ordrenet deomp senti outi.*

Fanch. Petra eo ar c'honcil à Drant ?

An Aoutrou. Eur c'honcil pehini a zo bet assamblet en eur guear hanvet *Trente*.

Glaoda. Mad, me soung e dign ar c'honcil-ze a yoa hanvet ar c'honcil a Drant abalamour n'oa nemet tregont escop assamblet, rac *trente* e gallec a sinifi *tregont* e brezounech.

Fanch. Glaoda zo eur paot habil, o pet sounch !

Yan. Quenta concil a vezo assamblet e vezo galvet evit rei e avis.

Glaoda. Paquet houn adarre ; mès n'eus forç, evel ato, daoust pe gen azen houn e c'houzoun meur a c'her gallec.

Fanch. Eur gallegueur terrupl !

Yan. Surtout pa ves tom d'ê fri ! pa ves bet er foar pe er marc'hat ne voar mui a vrezounech, ne grainch neuze nemet gallec, ha gallec en deün, rac an aoutrou persoun mêmès en deus beac'h, ya beac'h, ous e entent, gallec fin, ententit mad.

Biel. Alon, potret, list pelloc'h ar paour queas Glaoda ; gouzout a rit ervad en deus promettet renonç da Yan-Vourdel.

Glaoda. N'em eus quet ancounac'heat va fromessa ; va guelet oc'h eus-me *ambrumet* abaoue morlargez ?

Fanch. Nan-avad , en anzao a rencomp ; ar pezh a leveromp bremà ne deo nemet evit farçal.

Yan. Noc'h eus quet lavaret deomp , Aoutrou , petra eo an Tadou Santel ac an Doctoret eus an Ilis.

An Aoutrou. An Tadou Santel ac an Doctoret a zo Esquibien pe Velêyen devot ac habil pere ho deus divennet ar religion enep an heretiquet ac an dud difeis dre scrijou savant pere a zo bet approuvet gant an Ilis , evel Sant Gregor , Sant Jerôm , Sant Ambroas , Sant Augustin , Sant Bernard , ha cals re all.


Fanch. Livirit deomp , aoutrou , petra eo un heretic.

An Aoutrou. Eun heretic a zo eun dén pehini a refus credi unan bennac , ac aliès ouspen unan eus an articlou a feis evel ma hint desquet deomp gant an Ilis catholic , dre exempl lavaret ha credi n'eus purcator ebet. Refus senti ous hon Tad Santel ar Pap ac ous an Ilis catholic , var n'eus forç pe seurt digares a zo beza schismatic.

Fanch. Evel-se-ta an heretiquet ac ar schismaticquet a zo tud pere ho deus ho c'hreden ho-hunan ha pere a zisprich hor Mam Santel an Ilis ac an gourc'hemennou e deus great.

An Aoutrou. Ma ve permettet da bep unan ober e lèzennou ne ve peoc'h ebet er rouantèles; er mêmès tra ma ve permettet da bep christen refus d'en-em zoumeti da certen gourc'hemennou eus an Ilis ne ve mui nemet eur squeud a religion, rac pep dén pep santimant; an denvet ne selaouont quet mouës ar pastor a zo risclet da goëza etre griffou ar bleis, ac ar gristenien ne sentont quet ous hor Mam Santel an Ilis, ous ar Bastoret, a zo ive danger bras evit ho silvidiguez.

Divèzat eo, echuomp var guememân, quen a vezo dissul.



PEDERVET BEILLADEC.

Biel. Ha n'oc'h eus quet aounn, Aoutrou, o velet pe seurt banden oump deut hirio d'ho cuelet?

An Aoutrou. Sur aoualc'h, ya, e brassoc'h ar goumpagnunes hirio evit dissul.

Biel. Ar botret o clevet e teuemp da veilla d'ar maner ho deus c'hoanteat dont ive en esperanç ho pezo ar vadelez da gounta eun histor dezo, rac ho fligeadur eo clevet historiou.

An Aoutrou. Ha bugale fur hint-i ?

Biel. Evit ac'hano vad, bugale dranquil a zo aze ha mad da labourat.

An Aoutrou. Alon, potret, en-em renquit e quenver an tân, ha selaquit mad an histor a gountign deoc'h.

Yannic, Olieric, Jacquic, Victoric, etc.,
o veza azezet, *an Aoutrou Kerfur a guntas*
an histor-mâ (traduite de la morale en action).

HISTOR.

Eun digentil yaouanc, cacet d'ar scol evit beza officeur, ne zebre bemdez nemet souben ha bara seac'h. Ar mestr o credi ne rea quemenn-se nemet dre eur speret a binigen, en reprenas; an dén yaouanc a guntunu eb rei da anaout e secret. Eur mestr all huelloc'h o veza clevet quemenn-se êr c'hemennas, ha goude beza ordrenet dezân, gant douçder, en-em gonformi da gustumou ar scolach, er gourdrous, ma na chench à gundu, d'en lacat er meas ha d'e gaç d'e famill.

Gouzout a fell deoc'h, aoutrou, a respount neuze an dén yaouanc, perac ec'h en-em gomportan evel ma ran? hebian, me ya d'er lavaret deoc'h : e ty va zad ne

zèbren nemet bara tors , bara du , tempret en dour ha nebeut anezân ; amà em eus souben vad ac e tebran bara guinis ar peza garan da zibri ; me gaf e ran cher-vad ha n'houn quet evit en-em resolvi da zibri bouet all pa soungéan e pe seurt stad emâ va zad ha va mam.

Ar vistri n'oant quet evit miret ho daëlou o velet eur c'hraouadur quen tener ha quer resolyet. — Ho tad , a repren ar mestr brassa , ha n'en deus quet a bansion digant ar Roue ? — Nan , defot arc'hant n'en deus quet gallet caout ar paperiou necesser evit obten eur bansion ; guell eo bet gantân choum en e baourentez eguet quemeret d'eb esperanç d'o faëa. — Hebian , m'ar deo guir quemen-se , evel m'er c'hredan , me bromet obten evit ho tad pemp cant lur bansion. Credabl eo n'ho peus quet bet nemeur a arc'hant evit dont d'ar scolach , chetu amà tri louis aour a roan deoc'h eus a bers ar roue evit en-em regali assablès gant ho camarades. Bezit dichagrin evit ho tad , me ya da gaç dezân en avanç c'huac'h mis eus e bansion. — Penaos , aoutrou , e c'hellot caç d'am zad an arc'hant-se ? — Bezit disourci , moyen a gavimp d'en ober. — Ah ! paour queas aoutrou , quemerit me ho ped , an tri louis aour oc'h eus roët dign ha laquit ive ho rei d'am zad ; me n'em eus izoum ebet anezo amà , ac an arc'hant-se

a rai vad dezân evit e sicour da veva va breudeur ha va choarezet.

Biel. Guella craouadur ! ar seurt bugaleze a zo roues en amzer-mâ. Guelet a reomp aliès tadou ha mamou rebutet en ho c'hosni gant ho bugale, obliget da vont da glasq an aluzen goude beza collet ho yebet evit maga bugale ingrat ha dinatur.

An Aoutrou. Doue a bromet eur vuez hir ha prosperite d'ar vugale a respet ho zad ac ho mam, ac evel ato e velomp bugale o refus rei bara da eun tad ha da eur vam pere ne ellont mui labourat ; ac en zo netra horruploc'h !

Olieric. Evidon-me ne rign quet evel-se, yun a rign quentoc'h eguet lèzel va zad da souffr naoun.

Yannic. Ha me ive !

Yvonnec. Countit deomp eun histor all.

An Aoutrou. Aoun am eus d'o c'hinoui.

Jacquec ha Victoric. Ne vezomp james inouet o clevet counta historiou.

Glaoda. Emâ ar botret en-em gavet en ho fligeadur.

An Aoutrou. Peoc'h eta, ha me ya da gounta eun histor all.

HISTOR AR PAISANT COURACHUS.

(Morale en action).

E certain broyou ez eus steariou pe rivierou bras pere, pa ves cals glaoeier, a deu da gresqui en eur feçoun spontus. Malheur neuze d'an tyez, d'ar milinou ha d'ar chaosseriou a zo var gan ar rivierou-ze.

Eur blavez : ar stear, hanvet e gallec *l'Adige*, a yeas dreist horre ac a reas cals diſtruch. Ar pont pe ar chaosser eus ar gueur a Veronn a oue pilet ha scubet gant an dour, an eil ranvel goude eben. Ne choume mui nemet ar ranvel greis var behini e zoa eun ty eus a behini an dud n'ho doa quet bet a amzer d'en em savetei araoc an dour coll. Eus a bep costes d'ar stear e velet an dud queis-se o sevel ac o c'hasten ho divreac'h evit goulen sicour ; an dour a c'hounenze ato. O velet eun danger quer bras, eun aoutrou nobl eus ar vro-ze, hanvet Spolverini, a bropos cant louis aour d'an hini a vezo courachus aoualc'h evit mont gant eur vag da gaç sicour da eur famill prest da berissa. Danger a yoa pe da vont en drif gant ar mare ha gant an avel, pe da veza confountet e goelet ar rivier gant ar ranvel ac an ty pere a yoa cleuzet gant an ners eus an dour, ha pere a yoa prest

da goëza. Eun infinite à dud a yoa present ha dén ne grede en em avanturi en aoun da veza beuzet. Er mémès istant e teu da dremen dre enò eun dén divar ar meas. Parlant a rear dezân eus an affer e question ac eus ar recompanç promettet. An dén courachus-mâ ne choum quet da varc'hata lamet a ra en eur vag, en-em lacât a ra da rouenval, erruout a ra gant cals a boan e quichen ar ranvel greis, choum a rá enò evit rei amzer d'an dud queis; coz ha yaouanc da zisquen er vag, an eil goude eguile. Courach, emezân, chetu chui e meas à zanger. En-em lacât a ra adarre da rouenvat, avanç a ra en despet d'an ners eus an dour, erruout a ra eb avari betec an douar.

Spolverini a ya ractal da rei dezân ar c'hant louis aour : *ne verzan quet va buez*, a respount an dén generus-mâ, va labour a zo suffisant evit va maga, me, va greg ha va bugale, roït ar c'hant louis aour d'an dud queis am eus recouret, brassoc'h izoum ho deus evidon-me, pe guir ho deus collet quement ho doa. Cuntunui a ra ê hent, eürus ha countant da veza delivret tud pere n'o doa nemet ar maro da hedal.

Fanch. Me garfe e countac'h evel-se historiou eur veach en amzer, ne squissen quet eus ho selou.

Yan. Salo evige bet amâ potret ar pence!

An Aoutrou. Mont da laères ha mont da benceal a zo eur mêmès tra.

* *Glaoda.* Anaout a ran gouscoude cals tud pere a ya eb scrupul da benceal, ha pere ne garfent quet mont da laères.

An Aoutrou. Me ya da gounta deoc'h petra erruas eun dervez gant eun ozac'h eus a guichen Lesneven. Tostaat a rea gouël Miqueal, izoum en doa da ober arc'hant evit gallout paëa e vestr. Eul lunvez vintin e stêrnas ê guezec evit mont da gaç eur c'harrat guinis da varc'hat Lesneven. Ar c'hezec a deuas da spounta ac ar c'harrat guinis a oue treuhiet. Ar charreteur a red d'an amezeguez tosta evit clasq tud d'en sicour da zistreuhia e gar : dont a ra eur vanden goazet, mes eleac'h en-em occupi da zian-gagi ar c'hezec ac ar c'har, pep hini a zamous ê guein eur sac'hat guinis, ac a lès enò hon ozac'h estounet da ziscourbella e zaoulagat ha da zistumpa e gar evel ma c'hentento.

Glaoda. Ar paour queas ozac'h a yoa en em gavet e toues eun vanden laëroun ; rac ma vige bet an dud-se honest n'o divige quet refuzet er sicour da zistreuhia e gar.

An Aoutrou. Credabl eo, mès an dud a ya d'ar pence eb soungéal rei sicour d'ar vartolodet pe evit savetei ho buez pe evit

savetei ho danvez, ha n'int quet ive laëroun, pe guir e tigeaont gantho traou pere ne apparchantont quet outho. Daoust ha bras-soc'h pec'het eve laères guinis eur paisant eguet laères marc'hadoures eur c'hapiten à lestr; laères var an douar, pe var an hent, eguet laères var ar mor pe var bord an aot?

Ar religion a ordren deomp rei sicour dan dud affliget ac izoumec, an hini eta elac'h rei sicour d'ar verdaïdi a ya da glasq ho filla, a zo indin da zouguen an hano a gristen. Eun dra horrupl eo guelet christenien pere a dle en-em garet evel breudeur o vont d'an aot da zistum danvez ha madou pere a apparchant ous tud, christenien evelto.



PEMPET BEILLADEC.

***Var an droumplerer er marc'hajou
ha var ar gonsession.***

An Aoutrou. Azesit, goazet; petra gountot a nevez dign?

Biel. Noc'h eus quet clevet pe seurt coll a zo erruet gant Fanch an Du?

An Aoutrou. Pe seurt coll?

Biel. Marvet ê gazec yell, eus a behini en doa cavet eis ugent scoet. Anter ruinet eo ar paour queas dén.

An Aoutrou. Ne zigoes netra nemet dre bermission Doue. Fanch an Du, er gouzout a rit couls ha me, a zo eun dén difeis : ne respet na sul na gouël pa vez quistion da vont d'an naot pe da charreat ; fellout a ra dezâ destum danvez ha dre'n or ha dre'r prenest ; ne glasq nemet troumpla pa za d'ar foar gant ê loënet. Doue en deus permettet ar c'holl-ze evit ê gonvertissa. Ar malheuriou, ar c'hlenvejou, ar c'hollou danvez a zo aliès avertissamanchou a ro Doue d'ar pec'heur.

Yan. Evidon-me a gaf dign eo guelloc'h beza paour ac honest eguet beza pinvidic ha frippoun.

Biel. A viscoas em eus clevet lavaret penaos madou goal aquisitet ne brospere quet. A bred pe zivezad al laër a ves scoet gant Doue.

An Aoutrou. Ne reomp jamès d'ar re all ar pez ne garfemp quet a ve great deomp hon-unan. Ne garit quet beza troumplet pa zit da brena, he-bian ne glasquit quet troumpla pa zit da verza. Levirit dign ha c'hui a hell caout ho coustianç direbech goude beza lavaret cant ha cant gaou evit guerza eis ugent scoet eur marc'h pehini ne dal quet marteze pèvar-ugent scoet ?

Fanch. Mès ne vemp quet evit guerza nac hor c'hezec nac hor saout ma lavarfemp ar vriones.

An Aoutrou. Digareziou vean, rezouniou fall ! Ne lavaran quet e veac'h ato obliget da ziscleria oll defotou ho loënet, mès lavaret ho deus qualiteou ha n'o deus quet, quemen-se a zo lavaret gueïer, a zo troumpla, n'eus netra sclearroc'h.

Fanch. Mès ni a vez troumplet ive !

An Aoutrou. Ac abalamour ma'z eus frippounet ha troumplerrien c'hui a fell deoc'h beza ive frippoun ha troumpla ! Bezit sûr penaos o c'heulia an hent-se e viot laqueat en ifern e coumpagnunez al laëroun ac ar forbanet.

Glaoda. Ac'hanta, va mignoun Fanch, em-aor ive bremà o starda ar guissou deoc'h ; iit bremà da zutal gant al laëroun !

Biel. Aze eo, Glaoda, evel-se eo caçz an dors d'ar gear !

Glaoda. Oh ! n'eo quet re abred ; me yoa pell-zo o clasq pleg var ar paot Fanch ; m'ho tesco, camarad, da verza quezec dall eleac'h quezec born !

An Aoutrou. Cheinchomp caos en aoun ne zavfe bataill etre Fanch ha Glaoda.

Glaoda. Oh, n'eus quet a gounge da facha, ha nequet Fanch ?

Fanch. Noump quet sot d'en-em facha evit badinerez, Glaoda ne ra nemet rei mounis dign eus va fez.

An Aoutrou. Remerquet em eus eguentaou en oferen, eun dén yaouanc guisquet è soudart, piou eo ennes ?

Biel. Ennè eo map Yan vras pehini a yoa eat d'an arme seiz vloas-zo, ha pehini a zo erruet èr gueur gant e gounge, er sizun dremenet.

An Aoutrou. Guelet a rit penaos quement a ya d'an arme, ne varvont quet er brezel. Guell eo da eun dén yaouanc, gant pehini eo coezet ar sort, mont d'e regimant eguet dizerti ha beza obliget da guzat, ac ouspen ober cals mizou d'e dud evel m'eo c'hoarvezet meur a veach.

Eur paotric fur a yoa enò, mar em eus souch mad.

Biel. Ya sûr, ha mad da labourat, ennes n'oa quet eur feneant.

Yan. Ne gounteur quet e ve eas ober ar silvidiguez en arme ?

An Aoutrou. An dén en deus bolontes vad

a hell ober ê silvidiguez e pep leac'h ; Doue ne c'houlén nemet e c'hallout dious an dén. Me am eus anavezet soudardet pere a yoa devot ha vertuzus en despet d'ar goal exemplou a velent bemdez dirac ho daoulagat. An nep ne ziuall quet ous ar goal gompagnunez a zo en danger d'en-em goll er gueur couls ac en arme ; ac an hini a laca e fizianç e Doue ac a dec'h dious an danger muia ma hell ne vezo quet abandonnet gant Doue nac en arme nac e ty e dud.

Yan. Evidon-me a anaves meur à hini pere a yoa fur bras ha pere a zo distroet eus an arme diranch ha difeis meurbet. Guelit va c'henderf Louis ar Guen ; n'oa quet er barrès eun dén yaouanc evel-tân ; mont a rea da goves bep sul quenta eus ar mis ; mont a rea quasi bep sul d'ar rosera ; ne veze guelet nepret en tavargnou, modest oa evel eun Eal, ha bremà n'eus quet er barrès brassoc'h ailloun evitâ. Eur rann galoun eo d'e dud pere ho doa mall d'e velet o tont d'ar gueur en esperanç e roje souten dezo en ho c'hosni.

Glaoda. Guechall en hanvet ar santic, ha bremà e c'helleur en henvel an diaoul bras.

Fanch. Var digarez m'eo bet e Paris e cred beza eun doctor terrupl !

Glaoda. Mont a helleur da Baris var eur marc'h ha dont d'ar gueur var eun azen.

Yan. Ma n'eo quet eun donger guelet certain tud pere goude beza bevet e kear e touez ar yourc'hizien, ha beza desquet eur sclabez gallec a bretant e hellont beva evel payanet, choum eb mont na da oferen na da goves.

Fanch. Map Yan vras evit beza bet e Brest epad c'hoec'h mis, e qualite a baot mechaossi, en deus chenchet guiscamant ha ne barlant mui a vrezounec. Dissul eo bet er gueur guisquet evel eun Aoutrou, ne anavez mui e gamaradet; passeal a rea mêmès e quenver an aoutrou persoun eb prigeout divisca e dok nac e saludi.

Glaoda. Ma vigen-me bet tost d'ar fougaceur-ze m'em bige desquet dezân ar *polites* ! daoust a n'eo mui christen ? Eur soudart ne basse jamès e gapiten eb er saludi, ac eur c'hristen a dle ive, dre respet, saludi e bastor ha ministret Jesus-Christ.

An Aoutrou. C'hui zo *poli*, Glaoda, ha nicun ac'hanomp n'en devige sounjet; va bennos deoc'h; ne gavan netra quen divalo eguet guelet eur païsant o passeal e bastor eb divisca e dok ac o parlant outân dre e hano; piou a respetimp ma na respetomp hor belêyen, hor pastor, hon tad spirituel ?

Yan. Anaout a ran bourc'hizien pinvidic ha desquet mad pere a zo christenien devot ha vertuzus, ma carfe ar botret ac ar merc'het

a ya da servicha e kear quemeret squer dious ar re-ze, ne golfent quet ho religion.

An Aoutrou. Mès, Yan, ha ne ouzoc'hui quet penaos e tesqueur quentoc'h an drouc eguet ar mad? E kear siouas! e veleur cals tud pere n'o deus na feis na religion; exempl ar seurt tud-se a zo meurbet noazus d'ar baïasantet pere n'o deus quet eur feis crên na descadurez aoualc'h. Evelquent beza ez eus païasantet pere ne reont van evit guelet bourc'hizien kear o vancout d'ho deveriou a religion. Eur c'hristen mad ne dle quet caout aoun evit practica e religion e kear evel var ar meas.

Glaoda. Mad, beza ez euz cals coueryadet pere ne vancout na d'an oferen na d'ar gousperou, ha pere pa'z eont da baea ho mestr eun-dervez vigil, a zêbr quic en aoun ne ve great goab anezo.

An Aoutrou. Guezit ervad, quen e trezoc'h païasantet, penaos mar douc'h ferm en ho creden ha fidel d'ar religion, e viot istimet gant ho mistri ha pa n'o defe ho-unan tam religion. Paz-it eta e kear, pe da baëa ho mestr, ne drahissit jamès ho coustianç; soun-git penaos an dud impi da bere e clasquit pligeout ne hellint quet ho tenna eus a dre daouarn an Doue a offañcit.

Glaoda. Daoust pe-guen terrupl potret e

tisquefont beza , ar vourc'hizien a renco mervel couls ac ar baïsantet.

An Aoutrou. Allas ya , n'eus quet enò da lavaret nan. Pebes chenchamant a erru neuze ! Ma velfac'h an dud impi-ze pa dosta heur ar maro , o crena ac o c'huanadi , e c'havessac'h penaos n'int quet dizourci var stad ho c'houstianç. An dud pere ne vezont james var dro ilis , a c'houlen neuze eur bêlec evit gallout coves ac en-em reconcilia gant Doue. En dra edont e yec'het n'ho doa aoun rac netra , mès pa velont doriou an eternite prest da zigueri e commançont da chench santimant ; mès aliès , siouas ! dre eun effet a justic Doue an amzer a vanq dezo evit lacat urs en ho c'houstianç ; Doue en deus promettet ar pardoun d'ar pec'heur penitant , mès n'en deus quet promettet dezân an dervez varc'hoas evit ober pinigen ; sot eta ha disquiant eo an hini a gundu eur vuez criminal var an esperanç d'en-em gonvertissa en heur ar maro.

Fanch. Ar pez a dle hor c'honsoli ha souten hor feiz eo ne velomp nicun goude beza bevet e guir gristen o caout queuz ac o chench santimant e guele ar maro. N'eus quet pell c'hoas em eus guelet o vervel Olier goz pehini oc'h eus anavezet oll ; laouen ha countant oa evel pa vige o vont da eur banquet ; kimiada reas dious e vugale , en

eur recommandi dezo beza fidel da Zoue , da assista bep sul -en ofèren , da vont da goves eur veach èn amzer , ha da veva assambles e peoc'h ac en union vad.

An Aoutrou. N'oun quet souezet o clevet quèmen-se ; Olier goz a zo bet a viscoas eur c'hristen fervant , eun dén honest , laouen ac amiabl ; caret ac istimet oa gant an oll ; requetomp digant Doue ar c'hraç da vervel evel-tân.

Biel. An dén en deus eur guir devotion , ac eus a behini ar goustianç a zo direbech a vez peur-liessa gaë ha laouen , eleac'h an dén a vuezeguez fall a vez peur-liessa trist ha goenvet.

Glaoda. Ar pez a zo sûr , eo penaos goude ma vezan bet o coves ec'h en-em gavan tranquilloc'h ac eassoc'h va speret.

Yan. Ne gavan netra diessoc'h eguet mont da goves ha gouscoude , evel a lavar Glaoda , goude ma vezan bet e vezan countant ac eassoc'h caout affer ouzign.

Fanch. Daoust petra zo caos eus an diegni o deus an darn vuya eus an dud o vont da goves ?

An Aoutrou. Hon ourgouill ; ne fell quet deomp en-em humilia. An drouc-speret a

oar ervad pe guer profitabl eo ar confession evit ar gristenien , ac a implich pep seurt moyenou evit ho distrei dious an dever-ze.

Fanch. Ha necesser absolutmant eo mont da goves ?

An Aoutrou. Ya certain , me ya m'ar quirit , d'er prouf deoc'h e nebeut coumsou.

Fanch. Ne c'houlennomp quet guelloc'h , marteze e zaimp da goves gant nebeutoc'h a ziegui ha muioc'h a zevotion.

An Aoutrou. Selaouit pis. Doue a zo mestr da etabliissa al lezennou a gar , ha ni a zo obliget da senti outâ. Hebian chetu amâ petra lavar Jesus-Christ en Aviel o parlant oud e vinistret : *ar re da bere ho pezo pardounet ho fec'hejou , ho fec'hejou a vezo pardounet dezo ; ac ar re da bere ho pezo refuzet pardouni ho fec'hejou ne vezint quet pardounet dezo.*

Ar c'houmsou-ze ha re all c'hoas , a zisques deomp penaos ar velêyen a zo etablisset gant Jesus-Christ barneurien ar c'houstiançou ; hoguen , penaos e c'hellint prononç ha douguen ho setanç m'a ne anavezont quet stad hor c'houstianç , ha penaos e c'hellint anaout stad hor c'houstianç ma na ziscle-riomp quet dezo hor pec'hejou ?

Eur bârneur ne dle quet prononç ar mêmés setanç e faveur an oll griminalet ; mès barn a dle pep hini ervez ma'z eo coupabl pe divlam ; ar c'honfessour ive a dle gouzout peur accordi ha peur refus an absolven evit brassa mad ar penitant ; mès penaos er gouzout ma ne anavez stad e goustianç ?

Bezit sûr penaos ma n'a vige ar gossession instituet gant hor Salver Jesus-Christ ê-unan ha gant an Ebestel var e lerc'h , ar gristenien guenta n'o devige biquen en-em zoumettet da eur gourc'hemen , da eur pratic quen humiliant evit ourgouil an dén. N'o devige quet manquet da respount d'ar velêyen pere ho devige parlantet da guenta eus ar gossession : *eus a bers piou e prezeguit al lezen nevez-sé ; Jesus-Christ nac an Ebestel n'o deus jamès parlantet eus ar gossession.*

Fanch. Evel ato em eus clevet iniennou o lavaret penaos eo ar velêyen o deus digacet an usach eus ar gossession.

An Aoutrou. Clevet aoualc'h , Fanch , mès quement a glevomp n'eo quet guir , disquezet em eus deoc'h brema souden penaos oa impossibl d'ar velêyen etablissa ar gossession pene-fed m'oa instituet gant Jesus-Christ. Lavaret a ran ouspen penaos ha pa ho devige gallet en ober , biquen n'ho devige er great.

Glaoda. Perac ?

An Aoutrou. Da guenta , abalamour ar c'hovès eo diessa tra a zo e stad ar velêyen. N'eo quet ebat tremen er goan , na peder na pemp heur o covès , sclacet gant ar riou ; n'eo quet ebat sevel a greis ar c'housq evit mont en nôs da goves eun dén clân na tostaat ous e vele en danger da baca e glenvet , evel m'eo c'hoarvezet meur a veach. D'an eil , abalamour , an oll , ar brincet , ar velêyen , ar pap mêmès a zo obliget da vont da goves evel an disterra eus an artizanet ac eus ar baïsantet. Ar velêyen eta oc'h inventi ac oc'h etablissa ar gonnession o devige clasquet ho diezament. — Caout a rafen meur à rezoun all evit prouf deoc'h penaos ar gonnession a zo etablisset gant Jesus-Christ mêmès , mès aoun am eus d'oc'h inoui.

Glaoda. Pligeadur am eus ous ho clevet. Sûr eo penaos an aoutrou persoun a ve easoc'h en e gampr , e quenver an tân , eguet o crena gant ar riou , bep sul vintin , ha bemdes ive , er gonnession.

An Aoutrou. Guelit c'hoas ac e zo netra avantajussoc'h evidomp eguet ar gonnession. Hor c'honfessour ne ro deomp nemet avizou ha cuzuliou mad ; hon instrui a ra eus hon deveriou ; hor c'honsoli en hor poaniou ; pa vezomp clân , abondounet gant an oll , gant hor c'herent mêmès , hor c'honfessour a deu

d'hor bizita ; en eur guer , hor c'honfessour a zo evidomp eun tad tener ac eur mignoun fidel pehini n'hon trahisso jamès , e vrassa desir eo hor guelet fur ac eürus. Ma vige fidel an dud da dostaat aliés oud tribunal ar binigen ha da heulia avizou ho c'honfessour n'e vige quet guelet quement a zizurs , quement a laëronci , quement a droumplerez e touez ar gristenien.

Cuntunuit , va mignounet , da `dostaat aliés ous ar sacramanchou ; ne selaouit quet tud impi pere ne fell quet dezo mont da goves abalamour ne fell quet dezo chench a vuez , en heur ar maro e viot countant da veza heuliet gourc'hemennou Doue ha re an Ilis.

Aoualc'h evit enôs : dissul m'ar souetit , e tigaçot ar botret adarre , ha me gounto dezo eun histor hir.

Biel. Ne vanco nicun eus ar vousset , ar re-ze ho deus re a bligeadur o clevet historiou !

An Aoutrou. Quen a vo dissul.



C'HUEAC'HVET BEILLADEC.

An Aoutrou. Digacet oc'h eus , var a velan , ar botret vihan d'ar veilladec , gouscoude an amzer n'eo quet brao.

Biel. Netra n'oa capabl d'ho spounta pa ho deus clevet è tliac'h counta eun histor.

An Aoutrou. Abars counta eun histor , me fell dign clevet a c'hui a vez er scol.

Yan. Ne vezont mui abaoe ma eo chenchet ar mestr scol.

An Aoutrou. Perac-ta ?

Yan. Ar mestr a yoa quentoc'h er barres a yoa eur mestr mad pehini a rea d'ar vugale avanç ; ennes a yoa eun dén fur , eun dén a religion , mignoun bras d'an aoutrou persoun ; mès an hini a zo bremà ne za quasi jamès d'an oferén , ha ne fell quet dezâ ober scol catec'hismou d'ar vugale ; evel ma hon eus anavezet quemense , ni hon eus en-em glevet da zerc'hel hor bugale er gueur en aoun ne deujent da veza bugale difeis ; me zo guell ganêen caout eur map fur , eur map a zougeanç

Doue a pa n'en defe tam descadurez ,
eguet caout eur map habil pehini n'en defe
tam religion. Eun dra gaër eo caout des-
cadurez , ya pa rear usach vad anizi.

An Aoutrou. Resoun oc'h eus , Yan , eur
mestr scol pehini n'en deus quet a religion
a hell ober cals drouc en eur barrès.

Glaoda. Mès penaos e hellimp-ni gouzout
pe ez eo ar mestr scol eun dén a vuezeguez
vad pe eun dén eb religion.

An Aoutrou. Abars lacat ho pugale er scol
goulennit cuzul digant an aoutrou persoun
ha grit ar pez a lavaro deoc'h.

Glaoda. Ha n'eo quet guelloc'h desqui
d'ar vugale labourat eguet ho c'haç d'ar
scol da goll amzer , da zesqui feneanti ?

An Aoutrou. Eun avantach bras eo evit
pep dén caout eun tamic descadurez , gou-
zout lenn ha scriva , evit gallout ober e
afferiou eb caout recours d'an estren ; mar
oc'h eus eta moyen laquit ho pugale er scol ,
mès choazit eur mestr fur pehini n'e roi
dezo nemet exemplou mad.

Glaoda. Goal guer e coust ar scol en
amzer-mâ !

An Aoutrou. Micher eur mestr scol a zo
eur vicher poanius ha cassaüs , n'eo quet

eun ebat caout affer ous tri-uguent n'a pevar-uguent paot ; quasimant eo eassoc'h beza er parc o labourat eguet beza cc'h ober scol. C'hui, quen entrezoc'h, paisantet, ne zellit jamès ous poan ar re all, ac a garfe caout scol d'ho pugale evit netra ; dispign a rit aliès, da zul ha da varc'hat, eur scoet en hostaleuri ac oc'h eus eur boan vras o rei pevar real er mis evit scolia ho pugale.

Fanch. Guir aoualc'h a levirit.

An Aoutrou. Evel-se e levereur penaos ar vretounet ho deus mui a sourci eus ho loënet eguet eus ho bugale. Ma teu eul loan da glenvel e zear buan da glasq eur medicin pe eun distrabinelleur pehini a vezo paët en e lavar, mès pa vez clân ar c'hreg pe ar vugale eus aoun da zispign eur guennec evit paëa eur medicin.

Yan. Goal flemmi a rit ac'hanomp bremà ;
Aoutrou.

An Aoutrou. Ne lavaran nemet ar vrionez ; daoust pegument e caran an dud divar ar meas e cafen meur a rebech da ober dezo.

Glaoda. Desquit deomp eta penaos e tleomp en-em gundui.

An Aoutrou. En-em gunduit e guir gristenien, observit gourc'hemennou Doue ha re an Ilis.

Glaoda. Ni a grede beza cristennien vad

An Aoutrou. Ne barlantan eus à zén e particulier, mès lavaret a ran penaos ez eus var ar meas cals christenien faos.

Glaoda. Penaos e ouzoc'h quemmen-se ?

An Aoutrou. Guelet a ran tud pere a bretant beza tud honest, pere ne garfent quet fourra ho daouarn e godel eun all evit quemeret eur pez dec guennec, ha pere n'ho deus scrupul ebet evit troumpla ho nessa en eur brena ac en eur verza, ac evit ober tor er feçoun-ze ouспен eus a ugent scoet marteze. Mont a raint da ober ho fasq eb beza covesseat ar pec'het-se ; ar seurt tud-se, Glaoda, ha n'int quet cristennien faos ?

Glaoda. Eo sùr.

An Aoutrou. Ha na velit quet aliès ous taol ar gommunion tud pere a zo e cassouni ous tud ho zy pe ho amezeyen, ha pere ne fell quet dezo pardouni, nac en-em reconcilia ?

Glaoda. Meur a veac'h em eus guelet an dra-ze.

Biel. Ar botret a goumanç disclara yen o c'hedal ma ve countet eun histor.

An Aoutrou. Ancounac'heat em boa edo ar botret amà, me ya da goumanç an histor, selaouit mad.

HISTOR.

Yan ha Marie.

Eur marc'hadour o veza en-em ambarquet evit an indes a c'hounezas eno cals arc'hant. Var benn eun nebeut blaveziou e laqueas urs en e afferiou evit distrei e Franç e peleac'h oa ganet ac e peleac'h edo e guerent. Digaç a rea gantâ e c'hreg ha daou graouadur, eur paot hanvet Yan, oaget a bevar bloas ; ac eur verc'h hanvet Mari oaget ebquen a dri bloas. Pa edont en anter hent e savas eun tourmant serijus ; ar pilot a lavaras edont en eun danger bras, abalamour an avel ho foulze varzu an eneziou ous pere al lest a vige, eb douetanç, freuzet ha bruzunet. Ar paour queas marc'hadour o clevet quemense a guemeras eur planquen hir ha ledan var behini e stagas e c'hreg ac e zaou graouadur ha var behini e thie en-em staga ive, mès n'en doue quet a amzer, rac ar batimant

o veza touchet ous eur garrec en-em zigoras ha quement hini a yoa er bours a goezas er mor. Ar planquen var behini edo ar c'hreg ac an daou graouadur a choumas var gorre evel eur vag vihan ac an avel er poulzas ac en taolas var bord eun enezen. Neuze ar c'hreg a ziamarras ar c'herdign ac a antreas en douar gant e daou graouadur.

Ar c'henta tra a reas pa en-em gavas en assuranc, oue en-em strinca d'an daoulin evit trugarecat an Aoutrou Doue d'e beza preservet; affliget bras oa gouscoude da veza collet e fried pehini a yoa eun dén mad; soungeal a rea c'hoas penaos hi ac e bugale a varf-ge en enezen-mâ gant an naoun pe e vigent devoret gant al loënet gouez. Bale a reas eun nebeut amzer e c'haloun mantret gant ar chagrin; remercout a reas guez carguet a frouez, ac o veza quemeret eur vas e tiscaras eur frouezen bennac evit rei d'e bugale, ac hi e-hunan a zebras ive anezo. Avanç a ra larcoc'h en esperanc da velet eun ty pe eur gabanen bennac, mès anaout a reas prest penaos edo en eun enezen desert, da lavaret eo, eun enezen e pehini n'eus dén ebet. Caout a

reas var e hent eur vezen deo ha cleus e pehini ec'h en-em rezolvas da basseal an nôs. Antor-nôs vintin ec'h en-em laqueas adarre da vale quen a squizas e bugaligou; caout a reas var e hent neziou laboucet eus a bere e quemeras ar viou, ac o velet n'oa en enezen-ze na tud na loënet gouez, ec'h en-em rezolvas d'en-em zoumetti da volontes Doue ha da ober e fossubl evit dihorren mad e bugale. Recouret e doa dre vonheur levr an Aviel ac eul levr all eus a behini ec'h en-em serviche evit assista en oferen ac ober e fedennou. Dre voyen al levriou-mâ e tescas d'e bugale lenn ac anaout an Aoutrou Doue. Eur veach en amzer e map a lavare dizi : *va mam, e pe-leac'h ema va zad? Perac en deus great deomp quitaat ar gear evit dont en enezen-mâ? Daoust a ne dui quiet d'hor c'hlasq?* Va bugale, a respounte ar vam baour, an daëlou en he daoulagat, ho tad a zo eat d'an eën, mès beza oc'h eus c'hoas eun tad all, pehini eo Doue; amà ema, daoust petra bennac n'er guelit quiet, Doue, ho tad ha va hini, a zigaç deomp ar frouez, ac ar viou; sourçi en devezo ac'hanomp epad ma er c'harimp a greis hor c'haloun ha ma vezimp fidel d'e servicha. Pa voezas

ar vugale-mâ lenn ec'h en-em occupent gant pligeadur eus ar pezh a yoa merquet en ho heuriaoù, epad an deiz ne barlantent nemet eus a guemen-se. Beza ez oant ouspen chentil ha sentus.

Var benn daou vloas ar vam a goezas clân ac evel ma c'hanavezas e tlie mervel prest e quemeras eur chagrin vras abalamour d'e bugaligou ; mès dont a reas da soungéal penaos Doue, pehini a zo quer mad, en devige sourci anezo, ac ec'h en-em gonsolas. Gourvezet oa er vezen gleus, ac o veza galvet e bugale e lavaras dezo : E m'ounn tostic d'ar maro, va bugaligou guer, eb dale n'ho pezo mam ebet ; soungit gouscoude penaos ne choumoc'h quet oc'h-unan, ha penaos Doue a velo quement a reot ; ne vanquit jamès d'er pidi, mintin ha pardaes, Yannic, ho pezet soingn eus ho c'hoar Mari ; ne scandalit quet anizi, ne scoit jamès ganti, chui eo ar brassa ac ar c'hrenfa, mont a reot da glasq dezi viou ha frouëz. . . . C'hoant e doa ive da lavaret eur goums bennac da Vari, mes ne doue quet a amzer ; renta reas an huanad diveza etre divreac'h e bugale.

Ar vinoret queis-mâ ne goumprenent quet ar pez a lavare ho mam, n'a petra oa mervel, soungeal a rejont oa cousquet ha ne gredent quet ober an disterra trous en aoun d'e diuna. Yan a yeas da glasq frouëz, ha goude beza coaniet e c'hourvechont e quichen ar vezen, ac ec'h en-em rojont ho daou da gousquet. Antronôs-vintin e ouent estounet bras o caout ho mam ato cousquet; cregui a rejont en ê breac'h, ac evel ne respounte quet e credjont oa fachet out-ho, ac ec'h en-em laquejont da lenva : *pardoun, va mam, emezo, ni a vezo furroc'h eviziquen.* Mès caer ho doue, ar vam ne respountas quet. Choum a rejont eno meur a zervez bete ma coumanças ar c'horf breina. Eur mintinvez Mari a laoscas eur griaden en eur lavaret : Yan, va breur queas, sell prenvét o tibri hor mam baour, red eo ho lamet, deus buan d'am sicour. Yan a dosteas, mès quement a flear a yoa gant ar c'horf m'az oa impossubl choum e quichen, ha ma oue countragn dezo mont da glasq eur vezen all evit en-em repui.

An daou graouadur-ma a oue sourcius da ober ar pez a yoa bet gourc'hemennet dezo gant ho mam abars mervel; bemdez

e pedent Doue ; quen aliès e lennent ho heuriaou ma ho guient dindan-heor ; goude ho lectur e zeant da bourmen , peotramant e c'hazement var ar gueot : neuze Yan a lavare de c'hoar : me am eus souch , pa oan bihanic , da veza bet en eur vro e peleac'h ez oa tiez bras ha cals a dud ; me am boa eur vagueres te eun all , ha va zad en doa eun niver bras a vevellou ; beza hon doa ive robennou pe saëou caër ; enn dervez va zad hon laqueas en eun ty pehini a guerze var an dour ha goude hon stagas var eur planquen , abaoue n'em eus quet e velet , me gred e coezas e goelet ar mor e peleac'h eo maro evel va mam. Quemmen-se a zo estounabl , a respountas Mari , mès erfin bolontes Doue , var e feçoun , oa ec'h erruje quemmen-se guaneomp , rac gouzout a rez , va breur , penaos ne erru netra nemet dre bermission Doue.

Yan ha Mari a choumas unnec vloas en enezen-mâ. Eun dervez m'edont azezet var bord an aot e veljont en eur vag cals tud du (*morianet*). Mari e doue aoun ac a fellas dizi quemeret an teac'h ; mès Yan a viras outi , en eur lavaret : choumomp amà , va c'hoar , ha ne ouzout quet ervad penaos

Doue a zo amà presant ac a viro ous an
 dud-zont da ober drouc deomp ? ar vorianet
 o veza disquennet en douar a oue souezet
 o velet ar vugale-mâ pere n'oant quet du
 evelto ; en-em zistum a rejont en dro
 dezo en eur barlant outo , mès e vean ,
 rac ar breur ac ar c'hoar ne ententent quet
 ho langach. Yan a gunduas ar vorianet
 d'an andret e pehini edo esquern e vam ac
 a gountas dezo penaos oa maro , mès ii do
 zro ne goumprenent quet ar pez a lavare.
 Erfin ar vorianet a zisquezas dezo ho bag
 ac a reas sin dezo da bignat enni. Evidon-
 me , eme Vari , n'em eus quet a c'hoant
 da vont , me am eus aoun rac an dud-se.
 Noc'h eus quet izoum da gaout , a respount
 Yan , va zad en doa servicheurien , mèmès
 liou gant an dud-mâ , marteze eo distro eus
 e veach ac e tigaç ar-remâ d'hor c'hlasq.

Antreal a rejont eta er vag pehini ho
 c'hunduas da eun enezen pehini n'oa quet
 goal bell ac'hano ac eus a behini an ha-
 bitantet a yoa sovaget , (*guervel a rear so-
 vaget , ar vorianet ac an dud divades pere a
 zo quer cruel ha quer barbar ma tebront an
 eil equile*) , recevet mad ouent eno ; ar
 Roue en-em blige o contempli Mari , lacat

a rea aliès e zourn var e galoun evit rei dezi da entent en doa carantez eviti. Mari ha Yan a zescas e nebeut amzer langach ar sovaget-mâ ac e teujont prest da goupren penaos e reant ar brezel d'an habitantet eus an enezeyer dosta, penaos e tebrent ar brisounierrien ac e c'hadorent evel eun Doue eur marmous bras pehini en doa eur vanden sovaget evit e servicha : an traou-ze tout a rea dezo caout queuz da veza quitteat ho enezen. Gouscoude ar Roue a felle dezâ, absolutant dimezi da Vari pehini a lavare de breur : guell e ve ganeên mervel eguet quemeret an den-ze. — Abalamour ma'z eo vil ? — Nan, va breur, abalamour ma'z eo mechant, ha ne veles quet penaos ne anaves quet Doue, ha penaos eleac'h e bidi, ec'h en-em laca var e zaoulin dirac ar c'hos-marmous-se ; levr an aviel a lavar ac a ordren deomp pardouni hon adversourien ac ober vad dezo, ac ar Roue cruel-ze a laca e brisounierrien d'ar maro ac ho dêbr mêmés.

Dont a ra eur souch dign, eme Yan : ma halfemp laza ar marmous vil-ze, e velfent ervad n'eo quet eun Doue. — Greomp guelloc'h, a reprenas Mari, hon heuriou a zesq

deomp penaos Doue a accord quement a c'houlennour diganta a galoun vad ; en-em laqueomp d'an daoulin , pedomp-en da laza e-unan ar marmous, neuze da viana ar sova- get n'en-em guemerint quet ouzomp-ni, ha ne roint quet deomp ar maro. Yan a gavas mad ha resounabl avis e c'hoar ; en-em lacat a reont er mêmès istant var ho daoulin ac ober a reont assambles ar beden-mâ : *Doue oll galloudec, pliget gueneoc'h rei ar maro d'ar marmous vil a zo amà, evit ma coumpreno an dud queis-mâ penaos eo c'hui epquen a dleont da adori ha non pas ennes.* Edont c'hoas var ho daoulin pa zavas eur c'hri bras e touez ar sovaget. Petra zo, petra zo, a c'houlen Yan ha Mari? — Ar marmous, hon Doue, o lamet eus eur vezen en eur vezen all, en deus torret e c'har ac a zo en danger da vervel. En effet ne zaleas quet da vervel. Ministret an Doue maro a lavaras d'ar Roue penaos Mari ac e breur a yoa caos eus ar malheur a yoa erruet, ha penaos ne vigent eürus nemet goude m'o devige an daou estranjour adoret Doue ar vro. Ractal e oue decidet penaos e vige offret eur sacrific d'ar marmous nevez pehini a yoa choaset evit ramplaci an Doue decedet ; penaos an daou ven (*Yan ac e c'hoar*) a deuje ive

da assista er sacrific, ha penaos, goude ar ceremoni, Mari a vige eureuget d'ar Roue; ma refuzont e vezint devet e beo gant al levricou eus a bere ec'h en-em servichont evit ober sorcerez. Mari a glevas quemmen-se, ac evel ma lavare belêyen an idolou penaos oa ii ho doa great mervel ho marmous, Mari a respountas dezo : mar deo me em eus great dezâ mervel e tlean beza puissantoc'h, galloudussoc'h evitâ, ac eleac'h adori ar marmous, ho Toue, ar marmous a dlie va adori-me; ar simpla a dle dougeañ d'ar c'hrênfâ; evel ato ne fell quet dign ho troumpla; n'eo quet me em eus lamet digantâ e vuez, mès hon Doue pehini eo mestr an cên ac an douar, ac eb permission pehini ne alfac'h quet tenna eur vleven eus va fenn. Ar c'houmsou-mâ a reas d'ar sovaget mont e coler; staga rejont Mari ac e breurous daou beul ac edont oc'h en-em brepari da allumi eun tantad en dro dezo, pa glesjont oa disquennet en enes eun niver bras a inimiet. Lézer a reont eno Yan ha Mari evit mont da gombatti, mès coll a rejont ar victor. Ar sovaget estranjour a zistagas hon daou zen yaouanc ac ho c'haças ganto d'ho enezen, e peleac'h ar Roue ho c'hemeraz evit esclavourien. Labourat a reant adalec

ar mintin betec an nôs en eur lavaret aliès : *servicha a dleomp hor mestr gant fidelite evel pa vemp ho servicha Doue mémès*, rac levr an aviel roet deomp gant hor mam, a ordren quemem-se.

Epad an amzer-ze ar sovaget a yea aliès d'ar brezel ac evel ho amezeïen, ar sovaget all, e tèbrent ho frisounierrien, da lavaret eo an inimiet a guemerent er goumbat : eun dervez e quemerjont eun niver bras, rac potret vaillant oant. Etouez ar brisounierrien-mâ pere a yoa ive morianet ec'h en-em gavas eun dén guen ; mes evel ma'z oa treud ar sovaget a ordrenas ma vige laqueat da larda abars beza débret. Garrottet e oue ha taolet en eur gabanen dister e peleac'h Mari e doue urs da gaç dezâ bouet. Va Doue, a lavare Mari eur veach en amzer, va Doue, ho pezet truez outâ. Ar prisounier guen estounet o velet eur plac'h guen evel-tân, a oue estounetoc'h pa e c'hlêvas o parlant e langach ac oc'h invoqui ar guir Doue. Piou, emezâ da Vari, en deus desquet deoc'h ar gallec ac anaout ar guir Doue ? — Ne vouyen quet, a respount Mari, hano al langach a barlantan ; va mam a barlante al langach-se, ha ganti em eus-en desquet,

evel me doa desquet deomp adori an Aoutrou Doue ervez m'eo merquet e daou levr hon eus, va breur ha me. Ha possubl e ve, a lavar ar prisounier, en eur sevel e zaouarn etrezec an eên ! mès, va merc'h, ha c'hui a alfe disques dign al levriou eus a bere e parlantit ? Ne maint quet ganên brema, mès me ya d'ho c'hlasq ha da glasq va breur. Sortial a reas ractal, ha prestic e teuas gant Yan pehini a zalhe ordinal an heuriaou precius. Ar prisounier ho digor evel en eur grena quement e lamme e galoun en e greis : ah ! emezân quer buan a m'en deus digoret unan eus all levriou, c'hui eo a velan dirazon, va bugale quer ? dilamit da boquet d'ho tad ac hastit da rei dign kêlou eus ho mam ! Yan ha Mari en-em daolas assambles etre e zivreac'h, ho daoulagat beuzet a zaëlou a joa. Erfin Yan a lavaras : santout a randidious an domder eus va c'haloun eo c'hui va zad, mès expliquit deomp penaos oc'h eus gallet sortial eus ar mor, ni a grede oac'h beuzet.

Pa benceas hon lestr, guir eo, e coes-joner mor, mès dre voyen eur planquen e hal-jongounit an douar en eun enezen ; me grede ive oac'h collet ho tri. — Neuze Yan a goun-

tas dezâ ar pez a yoa erruet ganto, ac an tad a lenvas dourec pa glêvas oa maro e bried. Mari a lenve ive, mès eur sujet all a rea dizi scuill daëlou. Allas! emizi, petra servich deomp beza cavet hon tad pe guir e tle beza lazet ha dèbret var ben eun nebeut derveziou! Ni a dorro e chadennou, eme Yan, ac a yelo hon tri assambles da guzat er c'hoat bras. Petra raimp-ni eno, a respountas an tad, ar vorianet hor paco, peotramant e varvimp gant an naoun. — Va list, a repren Mari, me respount d'ho savetei.

Sortial a ra en eur brononç ar c'houmzou-mâ, mont a ra var eün da gaout ar Roue ac o veza en-em strinquet d'e dreit : autrou, emezi, eur c'hraç vras am eus da c'houlén diguaneoc'h; prometti a rit-hu e accordi dign? — Er prometti a ran var va lé, rac countant houn eus ar servichou a rentit abaoue ma em eus ho quemeret etouez va esclavourien. — Guezit eta penaos ar prisounier guen eus a behini oc'h eus ordrenet dign caout sourci, eo va zad ha tad Yan; souch oc'h eus d'en dibri, mès treud ha eos evel ma'z eo, e guic ne ouffe quet beza mad, eleac'h me a zo yaouanc ha maguet

mad ; ar c'hraç a c'houlennan diguaneoc'h eo m'am dêproc'h-me en e blaç ; va list ebquen eis dervez evit caout ar bligeadur da velet va zad abars mervel.

E guirionez, a reprenas ar Roue, c'hui zo eur plac'h quer chentil ha quer gracios, ma n'e garfen, evit oll madou an douar, ho lacat d'ar maro ; c'hui a vevo ac ho tad ive : bep bloas e teu amà eur batimant carguet a dud guen da bere e custumomp guerza hor prisounierrien ; dont a raï souden ha neuze me roi deoc'h counge da vont da vro ho tad.

Mari a drugarequeas ar Roue ac en e c'haloun e rente graçou da Zoue da veza inspiret da eur Roue payen caout truez outi. Redet a reas da gaç ar c'hêlou consolant d'e zad ; ac eun nebeut derveziou goude ar batimant, eus a behini en doa parlantet ar Roue, o veza erruet, an tad ac e zaou graouadur en-em ambarquas ennâ. Laqueat ouent en douar en eun enezen vras eus a behini an habitantet a yoa tud eus ar Spagn. Ar gouarneur, pe ar chef, o veza clevet buez Mari a lavaras en-hân eunan : ar plac'h-mâ a zo paour ha duet

gant an eol, mès eur plac'h mad ha vertuzus eo, renta raï e fried eürus, guell eguet ma rafe ma vige coant ha pinvidic. Pedi a reas *Maurice* (hano an tad) da rei dezân e verc'h, en-em unissa a reas ganti ha rei a reas da Yan evit pried eur plac'h yaouanc eus e famill; beva rejont oll en enezen countant ac eürus; ne baouezent da admira ar brovidanç a Zoue pehini en doa permettet e vige Mari esclavoures evit rei dezi occasion da zavetei e vuez d'e zad.

Glaoda. Sür aoualc'h, potret, e teu an dour en ho taoulagat?

Biel. N'eo quet estounabl, caëra histor!

An Aoutrou. Guelit, bugaligou, pebes avantach eo gouzout lenn; penefe m'ho doa poaniet da zesqui en dra oa beo ho mam, Yan ha Mari n'ho devige quet anavezet ar guir Doue na goezet ho fedennou. Fidel ouent da Zoue, ha Doue ne abandonas quet anezo.

Yan. Ac'hanta, potret, n'eo quet poent mont da gousquet.

Ar Botret. Evit c'hoas n'oump quet squis.

An Aoutrou. Poannyit, potret, da zesqui; bezet respet evit ho mestr, divisquit en e bresanç ho toc pe ho ponet; en-em accus-tumit da veza quempen ha dereat; ne rit quet evel certen bugale pere ne voalc'hont jamès ho bizach nac ho daouarn abars mont d'ar scol pe d'ar c'hatec'hismou; pere ne rentont ar bonjour na da Vear na da Bersoun, pere a red da guzat en aoun da veza guelet. Eur voyen d'en-em breservi dious cals clenvejou eo beza neat ha quempen; ar yec'het ne gar quet al lousdouni, al loudouriach. Gouscoude ez eus tyegueziou var ar meas, tyegueziou pinvidic mêmès, e pere eo dangerus dibri ac eva; mar deo guen ho pragues diouallit peleac'h azeza en seurt tyez-se, peotramant e viot merquet ha sclabezet abars ma teuot er meas. N'oun quet evit coumpren pe seurt pligeadur ho deus certen tud o veva e creis an teil ac al loudouriach.

Glaoda. Pebes quantel evit al loudourennet ma vigent bet amà!

Biel. Poent eo mont d'ar gear, emâ passe dec-heur.

An Aoutrou. Houmân eo an nosvez diveza,

evit er goân-mâ. Ne ancounac'hait quet ar pez am eus lavaret deoc'h abaoue coummançamant ar goân.

Bezit honest, bezit fidel da accomplissa ho teveriou a religion, respetit ar velêyen, rac n'eus quet a religion eb belêyen, nac assuranc na tranquilité eb ar religion; henorit ha respetit ive ho mistri temporel, *rentit da Zoue ar pez a zo da Zoue ha da César ar pez a zo da César.*

FIN.

